

Deuprez
Kerplwennan


GANT ROMAN KERMEHE

TROIDIGEZH GANT KLERG

EUS

"La Bonne Sœur des Avettes."

(Eil mouladur kresket ha skeudannet)



Europez

keprbennan

GANT RONAN KEPMENE



TROIDIGEZH GANT KLERG

eus

"La Bonne Soeur des Aveues"

(Eil mouladur kresket ha skeudennet)

OB MEMORIAM

EGREGII VIRI PATRIAE SUAE AMANTISSIMI

JOSEPHI DUCHAUCHIX O.S.B.

HOC EDIDERUNT OPUSCULUM

POPULARES EJUS

VEDASTUS L. & MARCELLUS C.

E miz Gwengolo 1949, e oa bet embannet war " FONTAINES DE BORCELIANDE", deroù ur gontadenn gant Ronan Kermene (Dom Duchauchix) : " LA BONNE SOEUR DES AVETTES". Fellout a rae d'an oberour adlakaat da vevañ er gontadenn-se al lodenn-se eus Breizh-Uhel : ar Menez e-lec'h m'en devoa tremenet e yaouankiz. Ha feiz! an neb a anavez ervat tud ha gweledvaoù ar c'horn-bro-se, a adkavo a dra sur, er gontadenn-mañ un daolenn wirion anezho. A-boan zoken m'eo kemmet an traoù zoken en amzer a vremañ, daoust d'an neventizoù ha d'ar gizioù nevez a zo e Breizh-Uhel koulz hag e Breizh-Izel o kemerout lec'h ar re gozh....

D'al lenner eta da asantiñ mont war-lerc'h ar skrivagner a-dreuz ar Menez hag ar Porc'hoed-se evit ober anaoudegezh gant unan eus kornioù heverkaf Breizh. Arabat dreist-holll kemerout skouer diwar unan bennak eus lennerion "Fontaines de Brocéliande" ha na welas en istor Seurez Kerwenan nemet un danevell unton ha disliv eus amourouzion oc'h en em garout e pep furnez e-touezh ur boblañs-tud fur da dinoaz. Ar varnedigezh-se diwar-c'horre eo a voe pennaok ma voe paouezet da embann oberennig Dom Duchauchix. Kerse a voe ganin hag e tiskleris da Ronan Kermene pegement a zisplijadur am boa bet o welout lezel e zanevell war he c'hement all. Ha Ronan Kermene he c'hinnigas din war he hed ur pennadig kent e varv (+ 24. a viz Meurzh 1957, en abati an Uhelgoum, Doue d'hen pardono !). Ha n'am boe ket a geuz.

Rak enni ec'h adkavis Lokronaniz va yaouankiz, anezho tud didroidell ha koulskoude leun a fil, stag o zreid ouzh an douar met leun o ene a varzhoniezh kuzh, start ouzh al labour war ar pemdeiz ha devot da goulz an ofis hag ar bedenn, kalz ha rust a-ziavaez he ken tener e don o c'halon, dic'hoarzh ha goapaer un tammig bihan.

Hag ec'h adkavis ivez spered ha doareoù Ronan Kermene gant e stumm parfet da ziskleriañ ur menoz fentus bennak. Ha plijus-kenañ e kavomp-ni "didroidellezh" an oberour o lakaat e stumm-skrivañ da beurglotañ gant menozioù tud e gontadenn, dreist-holl reoù ar Seurez. Tener a dra sur, met hep kouezhañ er

B.

vrizh-tenerded : ar garantez, ar feiz, barzhoniezh ar maezioù hag a zo tra an dud eeun, a zo displeget gant un eeunded vlizidik ha peuringal...A-boan ma santer a-wechoù troioù-lavar re glasket, evel da skouer ar ger diwezhañ-holl eus ar gontadenn.

Daoust m'en devoa desket ar brezhoneg ha studiet ar yezhoù keltiek all, e skrivas Ronan Kermene an danevell-mañ e galleg. Kaout a re dimp enoriñ an eñvor anezhañ oc'h embann war he hed evit ar wech kentañ SEUREZ KERWENAN troet e brezhoneg gant ur Breizh-Uheliad ganet nepell diouzh parrez c'henidik Ronan Kermene.

T. An Timeur

(Kentskrid savet e galleg ha laket e brezhoneg gant Klerg)


NOTENNOÛIGOÛ DIWAR-BENN STUMM BREZHONEK AN ANVIOÛ-LEC'HIOÛ.

Brezhonekaet eo bet holl anvioù-lec'h ar gontadenn-mañ, hogen an darn- vrasañ eus ar brezhonekadurioù-se a zo traoù un tamm faltaziüs, evel LANBER- NEZ evit La Prenessaye (hemañ a zeufe eus Perennesata, a-harvez, ha nesoc'h d'an orin e vefe bet ar stumm PERENEZED, Ar Berenezed)- Koulz all LEZWERN- WENN evit Launay-Guéguen, (paj.4), KER-VEZIN, evit La Bédinière, KER-VOULD evit La Boultière, h.a.

Darn all avat, hon eus adroet dezho o stumm keltiek evel PLOUVAEL evit an distresadur Plémet, LOKRONAN evit Laurenan, Evit PLOUZAT hon eus heuliet Teofil Jeusset (Plessala). St YEGU evit St Jacut. SANT-UNED (paj. 5)

Bez'e oa avat anvioù all brezhonek-rik zoken en o stumm en deiz a hiziv evel KEVRANN, KERGOED, ha zoken KER-WIONVARC'H evit ar galleg Ville-Guyomard

E gwirionez e c'hellomp lavarput hon eus skrivet ar gerioù-se, hep klask an disterañ: e-giz-se ez int deuet dindan lizherennoù hor mekanik-da-skrivañ. Hag anv al levrig e-unan SEUREZ KERWENAN a zo bet hañvalaet diboan-kaer ouzh an titl gallek : LA BONNE SOEUR DES AVETTES" o vezañ ma talvez AVETTES e brezhoneg GWENAN. Evel just etre KERWENAN hag AVETTES ez eus kemm da vat. Hogen ar stumm KERWENAN a gaver evel anv-lec'h e Kamlez, da skouer. Fiziañs hon eus 'velkant ec'h adkavfe RONAN KERMENE e zanevellig zoken dindan distresadurioù an trour,-ur c'henvroad dezhañ,-rak eus Plouvael e oa hendadoù ar skrivagner...



(6*) JOZEF DUCHAUCHIX (Ronan Kermene)
Barzh " ar MENEZIAD "

(1*) 6 a viz Eost 1912 (30 vloaz)
degemeret er C'horsez
Lokournan(Bro-Leon)
(2*) 26 a viz Eost 1913, resevet
Barzh, en Henbont)

(3*) 1927, en Elayes(Vosges)
goude e oferenn nevez
(4*) 1930. (5*) Abati Charlieu (Loar)
(6*) Ebrel 1932: Chapel Menez -ar-C'hazh (Savoia)
(7*) E 1947 d'an oad a 65 bloaz.

+

DOM DUCHAUCHIX

Ganet ar 24 a viz Here 1882, e Lokronan-ar-Porc'hoed. Broadelour, skriva-
gner, marvet ar 24 a viz Meurzh 1957, en Abati an Uhelgoum, Bro-Savoa

P A V I N M A R O

PA vin maro, c'hwi a zeuio, ma mignoned,
D'ar sul, d'an abardaez, goude ar gousperoù,
Tost d'an iliz vihan, e kornig ar vered,
War ma bez ken dister e-touez an holl vezioù.

C'HWI a zegaso din bleunioù koant ar Mene:
Lann melen, brugoù glas hag ar balan dispar,
Ha, da skeudenn buhez peurbadus ma ene,
E lakfet en o zouez ur bodig uhelvarr.

C'HWI a lavaro din ha Barzhed 'zo dalc'hmat
O kanañ ar Frankiz, an tan sakr en o c'hreiz,
C'hwi a lavaro din (o pebezh keloù mat !)
Ha trec'het eo d'ar fin ar Gall, enebour Breizh.

NEUZE, mignoned ker, e trido ma c'halon
E goueled ar bez du, dreist planken an arched,
Ha keit ma vo douget a-dreuz d'an neñvoù don,
Gant ur barr-levenez e trido ma spered.

(1913)

WWW WW W W WW WW WWW W
 W WW W W W WW W W
 W W W W W W W W
 WWW WW WWW W WW WWW

Gant Ronan Kermene

vvvvvvvvvv

Ar sul kentañ a viz Eost e oa. Daoust ma talc'he da vale ingal abaoe un eur a oa, en ur astenn un tamm e gammedoù, ne seblante ket Per Aodren bezañ skuizh an diñsterañ. En ur dremen dre vourc'h Lokronan-Porc'hoed, en devoa ar paotr yaouank sellet ouzh e vontr, hag o welout e oa erru nev eur ha kard, e oa aet en un ostaleri da gemer ur bannac'h kafe, ha neuze en devoa kendalc'het gant e veaj goude bezañ goulennet an hent a gase da chapel Sant-Uned 'lec'h ma oa an oferenn hag ar gousperoù da vezañ kanet gant beleion ar barrez.

Bremañ e oa aet e-biou da diez Kevrann, hag e c'helle gwelout e skeud o vale en e rack war an hent poutrennek a bign goustadik-goustadik war-du beg ar Menez, etre kleuzioù kurunennet gant strouezh ha torgosoù-derv. Evel ur gonideg-douar hag a zo an eost evitañ e zigoll hag e levenez, e rae awechoù un ehan e toull-karr ur park bennak 'lec'h ma seblante an ed bezañ gobariet-mat, ha goude bezañ saouret gant e zaoulagad pouez ha melender an tañvoez hejet ha dihejet flour, un dudi, gant an avel, er beurevezh splann-se, e laoske ur griadenn a estlamm : "Va Doue ! Kaerañ parkad-gwinizh ! Kaerañ parkad-gwinizh !".

Dirazañ hag a-drek e gein e oa bagadoù bihan a bardonerion o vont war ar memes tu gantañ, ha war stankaat ez aent dre ma tostaed d'ar chapel.

Da geñver Ker-Wioñvarc'h, anezhi ur griadenn vras ha na vez ket gwelet diwar an hent bras, kuzhet ma'z eo en ur flagenn, tri pe bevar c'hant metr ac'hano war an tu kleiz, e welas Per ur goueriadez yaouank o tiflukañ eus un hent-karr, hag ouzh en em gaout dres a-geñver gantañ, stok emañ koulz lavarout. Un taol-lagad e-kuzh a reas ouzh ar genveajourez degaset dezhañ en ur stumm dic'hortoz. Homañ a oa gwisket plaen a-walc'h, met dilhad dereat a oa ganti evelato diouzh un devezh-pardon. War he blev liv-kistin, rannet dre ar c'hreiz, edo koef Lanbernez, aes-tre

da anavezout diouzh an^a dreñv anezhañ war astenn un tammig, met nebeutoc'h kouls -
koude eget foñs kapod Plouvael. E Lokronan-Porc'hoed hag e Gomene, ez eo plat
foñs ar c'hapod.

Ma lavaras Per outañ e-unan e tlee ar plac'h yaouank donet eus kostezioù
Traoù-Gwenn, hag he devoa troc'het berroc'h dre Lezwern-Wenn ar Gwazhioù ha
Ker-Vould. E pign ouzh he brec'h e oa ur baner-aozilh du plezhennet fin, hag a hañ-
vale bezañ ponner a-walc'h. Un dek kammed bennak a rejont keñver-ouzh-keñver. Hag
ar paotr yaouank a santas e oa ret dezhañ gorrekaat e gerzhed pe doullañ kaoz.
Toullañ kaoz an hini a zivizas ober. O treiñ e benn un tammig war-du ar plac'h

yaouank, hag o teurel outi ur minc'hoarzh hegarat, e lavaras sederik an tamm ane-
zhañ : " O vont da bardoñ Sant-Uned emeur ivez moarvat ? "

- " Ya ! emezi, da Sant -Uned emeon o vont, met skuizh 'on a-raok bezañ erru.

- " Neuze moarvat, hoc'h eus graet ur flipad mat a hent ?

- " Pas kement-se, met war deo erru laosk va dic'har dindanon ez eo abalamour em eus
renket bale buan. Uhel e oa dija an heol p'am eus kuitaet Sant-Salver Uhelañ. Dleet
e oa din bezañ deuet eus ar gêr da strink-an-deiz.

- " Sant-Salver Uhelañ ! En tu all d'ar ster vras !... Fidedoull ! Eo ! graet hoc'h
eus un tokad brav a levioù ! ", ha neuze war un ton fars e lavaras dezhi : " Daoust
ha da c'houlenn kousked pe da zegas kousked en-dro eo hoc'h eus treuzet lanneier
Traoù-ar-Menez ha koad bras Lezwern-Wenn ?

"- Da glask ar c'housked an hini eo, eme eben gant un ton tristik. " N'eus den ebet
du-mañ o klemm war ar reveur anezhañ, en amzer a ren. "

Per a soñjas etre e dog hag eñ, en devoa graet ur gammed c'houllo. Keuz
a savas dezhañ, hag edo o klask penaos dresañ e gaoz, pa zeuas mouezh skañvik ur
c'hloc'h bihan d'en em veskiñ gant ar sarac'h a lakae un aezhenn diheverz da sevel
e-touez delioù ar gwez, a-hed an hent.

"- Va Doue ! Va Doue ! eme ar plac'h yaouank. Gant na vin ket diwezhat en oferenn

"- Nann, nann ! N'it ket da vezañ nec'het. Ne zleomp ket bezañ pell ken tamm ebet.

"- Gwell a se ! Rak bez'ez eus unan bennak ouzh va gortoz. Mar n'am gwelfe ket va
Anna vihan o tonet, e tirollfe sur-mat da ouelañ.

- " Hoc'h Anna vihan ?

- " Ya, an hini yaouankañ eus va c'hoarezed. Va zad en deus he gopraet e Kergoed,
ur geriadenn eus kichen amañ, da vesa ar saout e-pad an ehan-skol. Divizet e oa
bet ec'h en em gavjemp da gloc'had diwezhañ an oferenn, e-tal dor vihan ar chapel.
Paourkaezhig vihan ! Pebezh mall a dle bezañ warni ouzh va gortoz ! Ar vugale 'vel
'ouzoc'h, ne chomont da en em soñjal pell. Marteze he deus bet lavaret outi hec'h-
unan a-benn bremañ : " Sezarina. n'erruo ket ! "

Dambrest goude, ec'h en em gavjont en antre an dachem-foar, anezhi ^{3.}
ur pezh prad tric'hornek, ma sav er penn pellañ anezhañ ur chapelig vihan, dezhi
prenestroù ojivennek : Chapelig Sant Uned (Sant Iduned, evit paotred an hagio-
grafiezh), ar sant a ro ar c'housked d'an dud n'o devez ket trawalc'h, hag hen
lam digant ar re a vez ponneraet o skiantoù muioc'h eget n'eo mat evit an ene hag
ar c'horf, gant ar reveur anezhañ.

Hastañ a reas ar bardonerion. Per avat, a zichañsas dezhañ santout
a-greiz-holl, e godell diabarzh e borpant, ur vured vihan en devoa lakaet enni
diouzh ar mintin kent diblanañ eus ar gêr.

"- Dimezell, emezañ, va digarezit. Goulennet ez eus bet diganin degas ganin d'ar
gêr ur bannac'hig dour eus feunteun ar Sant; met ar wech kentañ ez eo din donet
etrezek amañ, ha n'ouzon ket pelec'h emañ ar feunteun. Marteze e vefec'h barrek
da lavarout din ?

"- Feunteun Sant Uned ? emezi. N'eo ket aes da gaout. Nebeut-tre a dud a ya di.
Pell a-walc'h emañ diouzh ar chapel, en ul lec'h distro, ur pennad diouzh an hent,
e Lanneg ar Sperneg. Just, stok enni, an hini e vimp va c'hoar ha me o tebriñ hol
lein. Mar kirit, e c'hellin ho kas di goude an oferenn-bred.

" - Eus ar c'hentañ ! emezañ. Trugarez deoc'h en a-raok. C'hwi moarvat a ya da
vont e diabarzh ar chapel. Me a chomo er-maez. Ne vo ket diaes dimp en em gaout
goude an ofis.

- Nann sur, emezi, ne vo ket diaes ,rak ne vez ur bobl-tud nemet er gousperoù hep-
ken."

Un toullad kammedoù a rejont c'hoazh war-raok, ha Fer Aodren a welas
nepell diouzh dor ar chapel, harp he c'hein ouzh ur vogerenn-souten, ur plac'hig
hag a oa o sellout oute o tonet. Mont a reas Sezarina da gaout an hini vihan :
"M eus aon e oas o vont da ouelañ, emezi. Bez dinec'h eta, erru 'on". Hag en ur
lakaat war an douar ar baner a oa ganti ouzh koubl he brec'h e lavaras "
Traoù mat a zo deuet ganin eus ar gêr. Brav e vo dimp hon-divig bezañ asamblez
bremaik d'o debriñ." O vougañ an daeroù a oa bet evit strinkañ eus he daoulagad,
e reas ar verc'hig ur minc'hoarzh hag ec'h astennas he divrec'h d'he c'hoar henañ.
Homañ a stouas war-du he c'hoarig vihan en ur blegañ penn uhelañ he c'horf gant
kement a deneridigezh ma skoas ur c'hlaouenn e kalon al labourer yaouank.

Pellaat a reas Per diouzh an div c'hoar, ha mont e-touez ar bagad paot-
red a oa en o sav dirak an nor-dal, sioul ha diskabell daoust d'an heol, o ke-
merout perzh e pedenn an holl , en ur selaou kanarion ar c'heur hag ar merc'hed
o kanañ a bep eil pozioù ar Gloria.

Tra ma talc'her gant an oferenn, ez eomp da lakaat hol lennerion da ober
anaoudegezh gant an daou zen pennañ eus an istor-mañ.

Per Aodren a oa pennher. Kollet en devoa e dad, hag eñ yaouank c'hoazh. Ne oa ket bet addimezet e vamm, hag homañ o vezañ ma oa chomet tomm-tre he c'halon ouzh koumanant Kerwenan, an domani pinvidik degouezhet dezhi a-berzh he zud, he devoa savet he mab e karantez an douar, hag hervez gwellañ ha kaerañ gizioù an dud diwar ar maez. Edo ar paotr yaouank o paouez tennañ bilhed ha kavet e oa bet mat evit ar servij, pa gouezhas klañv e vamm en un taol koulz lavarout. Kerc'het e voe ar medisin war he zro raktal, met ar stumm ma hejas hemañ e benn a oa ur seblant eus ar re fallañ. Tapet ganti ur stankadur-gwad en he skevent, e voe sammet ar vaouez kaezh en ur ober un nebeudig deizioù. E miz Meurzh e oa kement-se. Da viz Du e tlee Per mont d'ar rejimant. Petra'zeuje domani Kerwenan da vezañ e-pad an tri bloavezh a renkje tremen er c'hazarn, bremañ, pa n'helle mui kaout evel diskarg-servij an digarez da vezañ " mab pennher intañvez " ?. Bez'e oa a-walc'h en ti ur mevel, ur paotr-saout hag ur vatezh; met ne oa ket ezhomm da vezañ divinour evit lavarout penaos, goude ma vije aet ar mestr war-raok, ne badje ket pell er goumanant, an intent vat etre an dud.

"- Ar pezh ac'h eus d'ober, a lavaras un eontr dezhañ ma oa aet d'e gaout da gontañ e nec'hamant dezhañ, ez eo degas da goumanant Kerwenan Seurez Paz-Rousel. Sed aze unan hag a rafe d'an traoù mont en-dro : tiegezh, labour ha loened ha tout."

Per a reas e soñj diouzhtu da heuliañ an ali edo o paouez kaout. Met pa doullas kaoz da Vari-Anjela Tepod, e tisklerias homañ dichek a-walc'h, evel pa vefe bet feuket : " Penaos ? Kuitaat va breur pa'z eo mac'homet gant e labour ! Ha keloù ur pempet bugel gant va c'hoar-gaer !"

War ar maez avat, n'eo ket an dinac'h kentañ peurliesañ un dinac'h groñs hag evit mat. Per eta, ne lakas ket brasoc'h pod-houarn war an tan evit-se, ha pemzek deiz da c'houde, e teuas en-dro da adskeiñ war an tach, hag e c'hellas gwelout penaos e ginnigoù o devoa lakaet tud Paz-Rousel d'ober soñjoù na oant ket re ziskalonekaus evitañ. A-du gantañ edo ivez superiorez Seurezed Menez-Karnez ar barrez, breuriezh ma oa Mari-Anjela kuzulierez enni, - ar pezh a dalveze dezhi an enor da gas er-maez banniel bras ar Werc'hez, gant ar prosesionoù. An Aotrou Person e-unan a-barzh ar fin a zeuas da soursial eus an afer, hag a skarzhas an holl skoilhoù diwar hent. Un deiz bennak e voe gwelet o tegouezhout e Paz-Rousel, gant un niverenn eus Lizheroù Breuriezh ar Feiz en e zorn :

"- Setu amañ levrig ar miz-mañ, emezañ, evit tud Breuriezh ar Feiz, tud ho tizenez, met ar miz a zeu, ho pezo ul listenn all dindan ho taoulagad, rak kontañ a ran warnoc'h evit sevel Breuriezh ar Feiz en ur c'hornad all eus ar barrez. C'hwi a zivin a-walc'h pehini !..."

Mari-Anjela a juntras he daouarn hag a blegas he fenn war he c'halon :

- " O Aotrou Person, Aotrou Person, emezi spontet un nebeudig, neuze e fell deoc'h^{5.}
e teufen da vezañ Seurez Kerwenan ?

- N'eo ket me eo a ro an urzh-se deoc'h, an Aotrou Doue an hini eo. Evel ur plac'h
leun a sentidigezh, grit ho pourchasoù ar c'hentañ ar gwellañ, ha soñjit ervat
er mad a c'hellot ober en ti-se 'lec'h ma'z oc'h galvet gant Providañs an Aotrou
Doue."

Ar 14 a viz Here war-lerc'h, ez eas Per Aodren gant e charabañ da Baz-
Rousel da gerc'hat lienaj, dilhad ha levriou-devosion ar Seurez. Homañ avat, a
chomas c'hoazh da dremen un nozvezh dindan doenn ti he zud-kozh, ha neuze antro-
noz vintin, ar 15, hag a zo deiz Gouel bras Santez Veur ar C'harmez :Santez Tere-
za Avila, Mari-Anjela hag he devoa lakaet an deiz-se evit mont kuit, a bokas en
ur ouelañ d'he breur, d'he c'hoar-gaer, d'he zri niz bihan ha d'he nizez, hag a
generas hent ar vourc'h evit mont d'an oferenn; ha goude an oferenn ez eas da
c'houlenn bennozh an Aotrou Person, ha neuze e skoas war-du he chomaj nevez.

War he hent, e kavas ur vignonez -vugeliezh dezhi, dimezet d'un den di-
war-dro : Mari-Roza Bertelod. Kerzhout a rae homañ en ur ober stamm war-lerc'h
ur bagadig saout a weled o sevel o friou togn en aer abalamour da ruflañ gwell
a se ar c'hwez vat fuilhet a bep tu gant an avaloù.

"- Ac'hanta ! Mari -Anjela, eme ar vaouez, setu ma teuit da chom en hor c'harter,
bremañ, rak o vont da di Ber Aodren emac'h, keta ? Ha da vezañ mestrez eno, ha
diouzhtu ! "

Ar plac'h vat ha dilorc'h ma oa Mari-Anjela a ziarbennas gant ur fenti-
gell ar pezh a oa anoazus eviti e gourc'hememoù didroidell-kaer eben : " Da vezañ
mestrez eno? emezi en ur c'hoarzhin kreñv. Feiz ! ya'vat pa ne don ket mat d'ober
traoù all.

An eil sizhun a viz Du, e voe galvet Per d'ober e servij-soudard da
Sant-Brieg, en 71-et rejimant war-droad. E-pad teir sizhun en devoa gwelst ar
paotr yaouank ar Seurez ouzh al labour, ha ma ne wiskas ket an dilhad-soudard hep
kaout un tamm keuz d'e gezeg ha d'e zouarou-labour, e oa disammet e spered evelato
eus an drubuilh en devoa bet e-pad mizvezhioù o soñjal e renkje kuitaat e zomani.
Mont a rafe al labour brav-mat en-dro, e koumanant Kerwenan, hag eno e vefe intent
vat etre an holl, ha sioul ha kempenn pep tra.

°°°

Tri bloaz a dremenas. Ur sulvezh bennak a viz Eost, e voe graet ur pred
bras e Kerwenan evit ar baotred yaouank diwar-dro :ur gouel en enor d'ar serjant
Aodren distroet d'ar gêr, echu gantañ e servij, goude pleustradegoù-brezel bras
rejimentoù ar C'hornog... Antronoz e lavaras Mari-Anjela d'ar mestr yaouank :

6. " Bremañ e vanko deoc'h soñjal dimeziñ. N'eo ket labour eo a vank kennebeut e Paz-Rousel !"

Per a reas seblant da gemerout an ali-se war an tu fall : " Ya, sur, emezañ. A-boan m'eo tennet diwar va chouk ur vourleunn, ma fell deoc'h lakaat un all din em c'herc'henn. Amzer am eus kent mont da verc'heta. Diwezhatoc'h e vo komzet eus se." Goude ar respont dichek-se e oa aet ar paotr yaouank kuit en ur ober ur c'hruz d'e zivskoaz. Hag e talc'has ar menaj da von war-raok. Per a roe d'ar vevelion ha d'an devezherion ar skouer eus ar sentidigezh ouzh urzhioù ar Seurez. Tri bloavezh all a yeas e-biou.

Er beure-mañ, pa oa diskennet Per eus e gambr goude bezañ gwisket unan eus e gaerañ gwiskamantoù, ha pa oa ouzh en em c'houleunn daoust peseurt penn-bazh a yafe gantañ en deiz-se da vale, e roas Mari-Anjela dezhañ ur vured plat bet riñset ganti gant ar brasañ evezh : " Degas a reot din dour eus ar feunteun varzhudus, keta ? Sant-Uned !... Biskoazh n'em eus gallet mont di. Ur wech hepken am eus gwelet tour ar chapel diwar lein ar Menez, un deiz m'edon o vont da Sant Yegu-ar-Menez, dre dosenn Gologoed ha Tosenn Yann Angilh "... Diouzh an ton ma voe lavaret ar gerioù-se e santed he devoa c'hoant bras Mari-Anjela en he c'halon da vont ivez da bardonañ. Hag ar paotr yaouank d'e dro a lavaras dousik, gant ur vouezh hag a ziskuilhe pegement a geuz en devoa e-unan : " Panevet ez eo skuizh al loened evel ma'z int, goude bezañ charreet kement all a foenn, am boa kaset an holl dud d'ar gousperoù, goude kreisteiz, met dav eo d'al loened kaout un tamm diskuizh. Hag ouzhpenn - marteze em eus ankounac'haet hel lavarout deoc'h ? - e tlean en em gaout er pardon assemblez gant va c'hamaradoù-rejimant. Da vloaz e vo aesoc'h din moarvat."

Un taol broust a roas Mari-Anjela da dog ar mestr, hag ouzh hen reiñ dezhañ e roas an ali-mañ dezhañ : " Na chomit ket da ruzañ war an hent, gant aon da vezañ diwezhat en oferenn. N'eo ket abalamour ne viot ket en ho parrez e c'hellot akuitañ gant an hanter eus an ofis !"... Minc'hoarzhin ne reas ken ar paotr yaouank en ur vont dreist an treuzoù. Ar Seurez avat, en em aozas da vont d'ar vourc'h, evel ma rao bep sul, da gomuniañ a-raok diwezhañ kloc'had an oferenn-bred.

+
+ +

Da respont d'an ITE MISSA EST eus oferenn-veur Dumont, e savas an DEO GRATIAS war an ton bras eus a-douez ar bobl, hag e voe gwelet o tont er-maez eus ar chapel stank-ha-stank, d'en em strewiñ a-dreuz park ar foar, ar bardonerion a oa bet kalonek a-walc'h da bediñ ha da ganañ e-pad tremen un eur, stardet an eil ouzh egile... Per n'en devoe tamm poan ebet oc'h adkaout e genveajerez-veure. O-daou assemblez e kemerjont an hent a ya war-du Ker-Vezin ha Kergoed. War an tu

kleiz, 'hed ur c'hant metr bennak en douarou, eo e weler feunteun Sant Uned. Ne vez ket darempredet nemeur, ret eo hen lavarout, ha dianav ez eo zoken d'an darn-vuiañ eus ar berc'herined devot a zeu d'ar pardon ar sul kertañ a viz Eost.

Ouzh ar verc'hig eo e komzas Per da gentañ, kement ha digeriñ ar gaoz :
 " - Lammat a rae da galonig bremaik a-raok an oferenn, keta, p'ac'h eus gwelet koef da c'hoar henañ e toull an dachenn-foar ". Abafet, ar pezh a oa plas, e wiskas dremm ar baotrezig-saout, ur stumm nec'het, hag hi da dreiñ war-du Sezarina d'en em erbediñ outi. Homañ a zeuas raktal war he sikour :
 " - O ya sur! Stad a oa e ni ouzh va gwelout oc'h erruout... Koulskoude emañ e ti tud vat, met n'eo ket memes tra hag ar gêr.

- Mont a ray ganeoc'h d'ar gêr emberr da noz ? eme Ber.

- Ne ray ket. Ret eo dezhi chom da vesa ar saout betek fin an ehan-skol da reiñ un taol-dorn d'he mistri hag a zo aet o-daou war an oad. Dalc'het ez eo zoken ar wreg en he c'herzhed un tamm, ha ma ne vefe ket bet ken fall he divesker, ho poa he gwelet en oferenn-bred. Tud a feson ez int o-daou. Met siwazh ! n'o deus ket bet nemeur a chañs : marv ez eo o holl vugale. Goude ar gousperou ez in betek eno, rak ezhomm am eus da vezañ er foar amañ warc'hoazh e Sant-Uned. C'hoant am befe da gaout ur vuoc'h-laezh vat. Ezhomm bras hon eus e gwirionez eus ur vuoc'h evel-se, rak setu c'hwec'h sizhun'zo ma renkomp prenañ hon amann : n'heller ket derc'hel er stumm-se."

Per hag ar plac'h yaouank n'o devoa ket ezhomm pelloc'h da glask danvez-kaoz : kavet ha tout e oa; hag en ur zivizout diwar-benn doare ar marc'hadoù bet er parrezioù diwar-dro, er mizioù tremenet, ec'h erruas hor bagadig- tud e-kichen ar feunteun.

Ul lec'h didro-kaer e stumm ez eo, met plijus koulskoude kerkent ha gwelet, ha zoken dedennus-tre. Ur pennad lanneg gant pezhioù torkadoù-lann, ur c'hleuz goloet a vrug damruz ha kurunennet gant gwez-bezv moan, - ar gwez-se hag a seblant bezañ gwisket dalc'hmat gant kreziou, evel ma lavare Anatol ar Braz, mar am eus soñj mat. Ar feunteun : ur stank mogeriet gant mein louet, goloet darn anezhi gant un dablezenn-vaen emañ ar spoenv arc'hantek ha ruz-ruz o klask he c'hrignat; an dour a red diouti, a ruilh a-hed daou pe dri zroatad dre ur c'han strizh bevennet gant mein, ha neuze e teu da vezañ ur wazhig hag a grog raktal da ziskenn, herr warni, war-du an Ninian a zammeler ar saonenn anezhañ izeloc'h-traoñ, a-drek gwez-avalou ha brouskoadou Ker-Vezin hag ar Geleneg.

Sezarina a ziskennas he faner d'an douar; he digeriñ a eure ha tennañ diouti boued paket gant evezh en ur serviedenn gwenn-kann. Per Aodren avat, a blegas a-us d'ar ganolig hag a gargas ar vured a oa bet fiziet emañ diouzh ar beure; he stoufañ a reas war e blaen, hag e reas van da vont kuit, petra bennak

8. ne oa troet kaer d'ober.

"- Debrit un tamm ganimp, paotr, emezi... N'ouzon ket petore anv hoc'h eus.

- Me eo Per Aodren, eme ar c'houer yaouank, Per Aodren eus Kerwenan.

- Kerwenan ?", ha mouezh ar plac'h yaouank a gemeras un ton doujus-meurbet. "Klevet am eus komz anezhi. Ni'zo merc'hed da Yann an Tenou, eus Kerojer, e-tal bourc'h kozh Sant-Salver Uhelañ, hogozik war hent Kerrien. Div c'hoar all am eus c'hoazh. Me eo an hini goshañ eus ar merc'hed, met ur breur koshoc'h am eus hag a zo oc'h ober e goñje en artilheri, e Roazhon; c'hoazh pemzek pe ugent devezh hag e tistroio d'ar gêr evit mat... Kemerit ur genaouad-bara'ta..

-Trugarez ! N'eo ket evit ober komplimentoù, met bremazonn em eus da vont da zebriñ gant kamaradoù-rejimat, dindan deltenn un ostiz am eus bet kaset ur ger dezhañ, en deizioù-mañ. Ret eo din diwall da zebriñ re, evit diskouez propriete da gegin an ostizez !

- Gwelloc'h keusteurenn ho po evel just, gant un ostizez eget n'eus amañ ganimp, met soñjit n'eo ket c'hoazh kreisteiz, ha souezhet' vefen ma vefe prest lein a-benn bremañ. Ha neuze moarvat, n'eo ket en em gavet c'hoazh ho mignoned.

- Nann ! ne oa hini anezhe en oferenn. Ur pennad mat a hent o deus holl d'ober.

Daou anezho a zeu eus Sant-Gouenoù hag unan all eus Plouzal

-O neuze, n'eo ket dav deoc'h hastañ kement-se ! eme Sezarina. Tañvait eta chaouis Kerojer hag amann Lanbernez."

Per Aodren dre zereadegezh, a droc'has ur jekennig tanav a vara hag a lakaas warni ur gontellad-amann gant ur ruilhennig-silzig. Goude ur c'hompliment hag a oa sur da blijout da Sezarina, e c'houlenas ar paotr yaouank :

"- Ur vuoc'h-laezh vat an hini a garfec'h kaout er foar ?

- Ya ! emezi, ur vuoc'h vat, met ket ul loen sinac'h.

- Marteze am befe unan diouzh ho c'hoant.

- Ket ur jerzeenn da vihanañ ? Ar re -seoù a ya kalz re a voued gante.

- N'eo ket ur jerzeenn, nag un normantenn-, ar pezh na vir ket outi da reiñ he femzek pe driwec'h litrad laezh bemdeiz.

- Ur vuoc'h evel-se ne zifetfe ket hor c'hraouiad loened-korn. Met evel just, ho pefe c'hoant da gaout ur briz vat eviti ?


- Er foar e-giz er foar ! Met ma kavfec'h diaes paeañ diouzhtu, e c'hellfen lezel amzer ganeoc'h da welout hag-eñ ez eo ur vuoc'h evel-se eo a glaskit.

- Diaes... Feiz ! Moarvat n'eo ket difennet kaout start an traoù pa vezer bet gwasket gant gwalennoù-a-gastiz !

- Kollet hoc'h eus unan bennak eus ho tud marteze ?

- Feiz ya ! Marv a zo marv bez' e vo triwec'h miz diriaou gentañ, hag e-kerzh ar goañv tremenet, va zad a zo bet tapet e c'har gleiz dindan ur wezenn edo o tiskar, ha ret eo bet troc'hañ ar c'har-se dezhañ... Ha c'hoazh ma vefe va breur er gêr da

Chapel Sant Uned (hervez ul luc'hskeudenn)



Koef Sant-Yegu.



Koef Kergaza (La Chèze)


1951

Koef Lokronen

GWISKAMANTOÙ
Sant Jili-ar-Menez

1946

Bugel
eus
Lkaonen (1900)



- War erruout emañ , keta ? evel emac'h o paouez lavarout .
- A-benn teir sizhun emañ d'an hirañ-tout. Dija hon eus kemeret douar diestaj, rak n'eus ket trawalc'h gant ar pezh hon eus, da vevañ pemp a dud."

War-lerc'h komzoù ar plac'h yaouank, e chomjont sioul ur pennad. Per Aodren a dapas e yalc'h eus e c'hodell hag a stouas war-du ar veaserez vihan
 "-O! arabat deoc'h ! eme Sezarina. Na roit netra dezhi, ma ho ped.N'eo ket kustum da gaout prezantoù, na dreist-holl arc'hant.

- Un digarez ouzhpenn neuze ! Ret eo dezhi kaout soñj eus pardon Sant Uned." Laket en devoa ar paotr yaouank ur pezhig gwenn da risklañ e dorn Anna. Klevet e voe ar bugelig o lavarout acnik un tamm, ur bennozh-Doue didrouz-kaer, e-keit ha ma selle ouzh al labourer gant daoulagad a bare eme strafuilh ha plijadur war an dro. Per goude bezañ savet e dog da saludiñ, a adkemere ar wenodenn a gase d'an hent bras, pa glevas mouezh Sezarina a-drek e gein. Distreiñ a reas da sellout : " Daoust hag e viot abred warc'hoazh vintin emañ ? emezi.

- Ne vin ket e-touez ar re gentañ,sur-mat, emezañ. Fell emañ Kerwenan diouzh Ianneg Sant-Uned !

- N'eus forzh ! arabat deoc'h gwerzhañ ho loen a-raok bezañ kaozeet ganin, pa'z eo boulc'het ar marc'had etrezomp.

- Ac'hanta ! mat eo ! Warc'hoazh vintin ec'h en em welimp adarre.

- Ma! neuze, kenavo warc'hoazh vintin war an dachenn-foar."

+
+ +

Diouzh an noz, pan erruas er gêr, e renkas Per respont un toullad goulennoù a voe graet outañ gant ar Seurez, traoù o sellout holl gwitibunan ouzh tu relijiel ar gouel, pa ne oa nemet se a gement a c'helle bezañ diouzh grad ar plac'h vat-se. Klask a eure ar paotr yaouank respont ken klok ha ma c'helle da derriñ c'hoant-gouzout Mari-Anjela; met he frazennoù berr hag awechoù e selloù goullou en e benn, a ziskoueze a-walc'h e tlee stourm outañ e-unan evit argas kuit eus e spered ur soñj ha n'en devoa seurt ebet d'ober gant ar gaoz. Goude koan ez eas er-maez d'ober ur c'hornedad-butun, hag e chomas pelloc'h eget kustum d'ober tro ar c'hrevier. P'edo o vont da bignat d'e gambr, e tistroas prim-ha-prim d'ar marchosi'lec'h ma veze ar mevel bras o kouskét, evit reiñ dezhañ un urzh hag a gave dezhañ e oa un urzh a bouez bras.

En ur pezh bihan stok er gegin e veze Mari-Anjela o kousket; hi eo a veze savet da gentañ e Kerwenan. Al lunvezh vintin-se, pa oa prest ar Seurez da vont er-maez eus he c'hambr, goude bezañ lavaret he fedennoù hir, e klevas trouz

10.
hemaj o sklintinat er porzh. Stouin a reas he fenn dre ar prenestr hag a oa chomet digor-bras e-pad an noz abalamour d'ar wrez, hag e welas ar mevel bras o vont war-du ar c'hraoù en ur hejañ e-pign ouzh e zorn ar c'helorn bras houarn-gwenn a dal-veze da c'horro ar saout.

-- Oc'holla! emezi. Matao n'eo ket diwezhat anezhañ ar beure-mañ. Hastomp buan mont da c'hwezhañ an tan dindan al ludu en oaled". En ur lavarout kement-se e teuas er-maez eus he c'hambred d'ar gegin, gant un tamm nec'hamant ar he spered, souezhet ma oa gant gred dreist-ordinal ar mevel bras. A-boan ma oa krog ar flamm da strinkañ eus ar bern skolpad dastumet war an oaled gant ar plac'h-tiegezh, ma voe klevet kammedoù o lakaat da strakal pleñchod ar gambr a-us d'ar gegin. Ar Seurez a zigoras he divskouarn. Ne oa ket da chom en arvar: klevout a raed trouz kammedoù e kambred ar mestr. Ur minc'hoarzh a darzhas war vuzelloù Mari-Anjela :

"- Ur burzhud en deus graet Sant Uned" emezi.

Bemdeiz pe dost, e veze pell Per Aodren oc'h esa dont er-maez eus e wele. Daoust ha deuet e oa gantañ eus pardon an deiz a-raok, nerzh-kalon awalc'h da dre-c'hiñ war ar pennad didalvedigezh-se ?

Ne voe ket pell ar paotr yaouank oc'h en em gempenn. Klevet e voe o serrin dor e gambr, hag ar Seurez sebezet hen gwelas ouzh troad ar viñs gant ur veluzenn war e chouk ha botoù-ler en e dreid.

"- O vont da veajiñ emac'h, er beure-mañ ?" emezi.

Ur pennadig e chomas Per da dortal, ha neuze e laoskas ar gerioù-mañ: "Ya! o vont d'ar foar emañ !

- O vont d'ar foar ? Ha petra emac'h o vont d'ober d'ar foar, Salver benniget !

- Me'zo'vont da gas ar Vailhenn.

- Gwellañ buoc'h-laezh ar vandenn ! N'emaoc'h ket e-sell d'he gwerzhañ 'alato ?

- Droed a-walc'h am eus moarvat da c'houzout peseurt priz a vefe moien da gaout eviti?"

War un ton kazus a-walc'h e voe lavaret ar gerioù-se. Kompren a reas ar Seurez ne oa ket mat dezhi goulenñ hiroc'h. Tapout a reas war an daol bara, jistr, ur pezh pladad kig yen, ha neuze e lakaas ur bannac'h kafe da doumañ war an tan. Ne voe ket pell ar paotr yaouank o tebrin e zijuniñ, ha ne lavaras ger. Pa voe peurevet e volennad kafe gantañ, e savas diouzh taol, ha mont er-maez war-du ar c'hraoù, hag eno e kavas ouzh hen gortoz ar mevel bras a oa o paouez goro ar Vailhenn. Stagañ a reas Per ur gordenn en-dro da gernoù ar vuoc'h ha gant kalz a boan e tegasas al loen er porzh. Dont a reas ar Seurez war dreuzoù an ti, ha gant he selloù e reas ur flouradenn da sae gaer liv gell ar vuoc'h nesañ d'he c'halon a yae da heul he mestr, en ur vlejal gant he fronelloù 'rez an douar. Ma voe darbet da Vari-Anjela leuskel ur griadenn " Na rit ken nemet he diskouez, ha

na zeuit ket d'ar ger hepzi !" Goude en em soñjal avat, e kavas furoc'h tevel. ¹¹¹
Distreiñ a reas d'ar gegin hag en em lakaat da c'hwezhañ war an tan a oa prest da
vervel, en ur lavarout sioulik outi hec'h-unan, nec'het, daoubennet ha poaniet :
" Dec'h da noz dija ne oa ket evel kustum. Petra a zo en em gavet gantañ eta ? "

Gant ur jestr gourdrouzus e pellaas Per dioutañ ar c'hi a seblante kaout
c'hoant da vont d'e heul, hag e reas d'al loen-korn tremen toull ar porzh, ha neuze
e heulias ar gardenn hag e kemeras war an tu kleiz an hent meinek a zifluke war
hent bourc'h Lokronan-Porc'hoed ha Ianneg Sant-Uned.

+
+ +

Pell a-raok kuzh-heol e voe gwelet Per Aodren oc'h en em ziskouez e
toull-porz h Kerwenan. E zivrec'h gantañ o hejañ a bep tu dezhañ, ponner e vale,
izel e benn, edo oc'h erruout, hag evel ma tegase gantañ d'ar gêr, taolet dibled-
kaer en-dro d'e c'houzoug, ar gordenn en devoa implijet diouzh ar beure da sachañ
ar Vailhem war e lerc'h, ne vije ket bet un dra diskiant hen keñveriañ ouzh an
dorfedourion-se a wechall hag a veze boutet war-du lec'h o merzherenti gant ar
bourrev, en ur zougen ar c'hevre-kanab e tleent dambrest branskellat ha mervel en
ur penn anezhañ.

Mari-Anjela hag a oa o wriat er gegin, en ehe c'hoazez ouzh an daol, a
savas he fenn o klevout trouz ar paotr yaouank pan erruas en ti. Sellout a reas
outañ talarek : " Bremañ ec'h ouzoc'h pegement e talvez ? "

- Feiz ya ! emezañ gant un aer un tamm bihan anoazet. Gouzout a ouzon ar briz a
d'alvez.

- Ma ! a zalc'has ar Seurez da lavarout, ni hag hon eus kement a ezhoñm a laezh :
amann da bourchas d'ar presbital, d'ar jandarmiri, d'ar gouent, da itron an apo-
tiker... Gallout a rit ober ho soñj da bremañ un all, kentañ foar a vo !

- Mat eo ! an ali a roit din a glot a-grenn gant va menoz va-unan. Ar sizhun a zeu
emañ foar an Dreinded- Porc'hoed. Kaout a rin aes-tre ur vuoc'h all e plas ar vuoc'h-
se hag a seblantit kaout kement a geuz dezhi.

- C'hoant hoc'h eus marteze d'ober konvers ar saout bremañ ? Eus ar c'hentañ, met
diwallit da goll arc'hant.

- Ya ! ya ! Diouzh se 'vo graet, mar bez moien ! "

Didaeriñ a reas Mari-Anjela : " Selaouit'ta, mestr, emezi, daoust ha da
dud diwar-dro amañ eo hoc'h eus gwerzhet ar Vailhem ? .

- N'eo ket. Aet eo zoken ur pennad mat ac'han. He gwerzhet em eus da Yann an Tenou
eus Lanbernez. E Kerojer emañ o chom, 'kostez ar Govelloù, pe gentoc'h Sant -Salver,
war hent Kerrien, ha just a-walc'h....

"- Just a-walc'h petra ?... "

-Divizet ez eus bet e kasfen ac'hanoc'h evit ar bloaz, da bardon Itron Varia'n Hollsikour . En ur dremen e raimp un ehan e ti Yann an Tenou hag e c'hellot en em rentiñ kont hag-eñ eo aet ar Vailhem eus ar prad d'al lanneg. Met keloù hor bo eus al loen a-raok teir sizhun amañ, pa zeuio ar paotr yaouank, pa vo echu e servij, da zegas ar 500 lur am eus c'hoazh da douch.

- Petra'livirit ? N'eo ket bet roet deoc'h holl arc'hant ar werzh ?
 - Termen a zo bet goulennet diganin. O nebeut-tre... Bez'ez int tud hag o deus bet chañs fall. Marvet eo bet ar vamm, n'eus ket tre daou vloaz c'hoazh, hag e-kerzh an nevez-amzer, an tad en deus kollet ur c'har gant ur wezenn bet kouezhet warnañ.
 - Mat hoc'h eus graet o roiñ amzer d'an tiegezh-se da baeañ peogwir o deus bet kement a wallerioù. Met evel just, kemerit kaosionoù, rak tud an Tenou-se n'o anavezit e stumm ebet.

- Penaos ? Tud ha n'anavezan ket ? "... Ha Per a gontas dezhi ger evit ger ar pezh en devoa klevet an deiz a-raok diwar-benn tiegezh Yann an Tenou eus Kerojer, e kichen bourc'h kozh parrez Sant-Salver Uhelañ."

Selaou a rae ar Seurez, souezhet an tamm anezhi, stouet he c'horf en a-raok, he genoù damzigor. P'en devoa echu mestr an ti gant e gaoz, e lavaras hep an disterañ soñj fall : " Met biskoazh n'ho poa komzet din diwar-benn ar re-seoù !"

Da guzhat ar ruz savet d'e benn, ez eas Per war-du ar viñs a bigne d'ar gambr a-us, hag o hejañ e zivskoaz e lavaras gant ur skeud a umor fall :

" Daoust ha tu am boa bet ur wech bennak da gomz eus se ?"

+
 + +

Erru e oa ar 7 a viz Gwengolo, derc'hent Gouel Ginivelezh an Itron-Varia. Sec'h e oa an amzer ha kaer. Gwenn e oa an hentoù gant ar boultrenn-se a vez lakaet da sevel un nebeudig hepken a-us d'an douar gant tremenadeg ar bagadoù-loened hag ar c'hirri, ken pommer evel ma'z eo en hor rannvro a Borc'hoed, gant ar greunigoù diniver a skant-maen, a c'hreunvaen hag a sabren a zo emni. Un aezhenn skañv-skañv a gase eus an eil keriadenn d'eben frond an avaloù o peurzareviñ war an diribinoù troet ouzh bannoù an heol.

E Kerwenan e oa bet staget ar gazeg ouzh ar charabañ kerkent hag echu lein, ar pred da greisteiz, hag e oa savet ar mestr ennañ gant ar Seurez. Lavaromp ouzhpenn e oa en em brientet ar verc'h devot-se da berc'herinded Itron Varia-Gerrien gant un naved pedennoù ha pinijennoù.

Sachet war-raok gant Bichetenn ar gazeg louet leun a dan, nevez-houarnet ha diskuizh-mat, e tiskenne ar wetur timat gant ar c'hrav a ya eus Sant-Lubin betek ribl al Lie, ar Ster Vras e-giz ma vez lavaret en holl gêriadennoù eus ar vro, ha zoken e kêr-Loudieg. Gweturioù all a ruilhe araozo, ha donet a rae re-all war o




KARTENN : PORC'HOED AN HANTERNOZ (AR MENEZ)
 HAG AR PENTEUR

1962

KARTENN Porc'hoed an Hanternoz hag ar Penteür

U vankout: Bre-ar-Spernenn, Paz-ar-C'hloareg
Paz-Rousel, Kerwenan, Krec'h-ar-Menez
Sant-Lin
Ar Govelloù = (Traon-Gwenn)



lerc'h. Eus pep hent bihan o kouezhañ war an hent bras ec'h errue a vagadoù bihan tud a bep oad o vont ivez d'ar pardon bras.

A greiz holl e tiskouezas Mari-Anjela gant he dorn teir maouez e gwenn hag a oa 'hed daou c'hant metr diouto o tiskenn an eil war-lerc'h eben gant un arrou-denn voan digoret e-kreiz ur parkad ed-du : " Ar re-se, emezi, eo Seurezed Paz-ar-C'hloareg, merc'hed Kalon Sakr Mari."

Per a lakaas e foet d'ober ur strakadennig, hag ar gazeg hag a oa morgouket a adlañsas d'an drot hir ha brav a rae dezhi bezañ sellet gant avi gant ar saverion-gezeg hag ar varc'hadourion.

Ken en em gaout gant ar pont diwareget taolet war ar ster a ziskenn eus uhelderioù koadek Pleug ha Gaoson, e tremenas gwetur Kerwenan ur wetur all leunchouk a vugale a weled en o c'hreiz ur seurez gant ur chal gwenn hag ur ouel du. Amzer he doe Mari-Anjela d'ober dezhi en ur dremen ur saludig gant he fenn : " Honnezh eo Janed Gaoter eus Bre-ar-Spernenn, emezi. Graet hon eus asamblez, bez'ez eus 5 bloaz, ur retred e ti Leanezed ar Groaz, e Merdrigneg. Gwelloc'h karmeziadez ez eo Janed Gaoter egedon-me. N'he deus ket bet aon, evel don-me, da jogañ hec'h abid-prosesion. E-lec'h lakaat va hini e koufr ar charabañ, e vefe bet gwelloc'h din he gwiskañ evit ar veaj.

- Arabat deoc'h kaout keuz, eme ar paotr yaouank. Hoc'h abid-karmeziadez a c'hellot gwiskiñ bremaik. Erru 'omp e Sant-Salver Uhelañ. Kerojer a zo 'hed daou dem-fuzuilh ac 'han."

Un nebeut munutennoù goude, ec'h ehane hor pardonerion dirak talbenn un ti dilorc'h hep mar ebet, met degemerus gant e borzh 'lec'h ne oa na plouz na karrigell nag ogedoù rag alar a-stlabez, ha gant e brenestri bleuniet gant fleur-nadoz ha fleur-kabusin. Ur paotr yaouank, ur gwaz anezhañ, war gorf e roched a dostaas gant un aer servijus hag amgraus. Tapout a reas krog e brid Bichetenn, evel pa ve lorc'h bras ennañ o tonet war-dro ul loen ken brav all.

- " Anñ ya! Hoc'h anavezout a ran, eme ar Seurez oc'h ober un minc'hoarzh d'ar c'hanolier nerzhus hag a oa deuet da Gerwenan, pemzek deiz kentoc'h da beurbaeñ priz ar Vailhenn.

Donet a reas div blac'h yaouank eus an ti, gant Anna, mesaerez vihan Kergoed war o lerc'h. An hini henañ a dostaas d'ar wetur hag a lavaras da Vari-Anjela : " Mar plij ganeoc'h, me ho sikouro da ziskenn. Deuet amañ din ho paner a zo ouzh ho strobañ."

- Dalit'ta, va merc'h. N'eo ket ponner, enni em eus lakaet va abid-karmeziadez. Poent bras eo din he gwiskiñ. Kontant e vefec'h, mar plij, da brestañ din ur sklaseñ vihan ?

- Ya laouen ! En em harpit warnon. Uhel eo ar stleug...."

4 Per ha Mari-Anjela a yeas-tre hag a seludas Yann an Tenou ha na oa ket deuet er-maez dre na oa ket gwall-gustum c'hoazh diouzh e c'har-goad. En e sav, harp e gein ouzh an daol, a oa e-kreiz an ti, mestr Kerojer a gouvias an dud nevez-degouezhet da azezañ. Ar re-mañ a gemeras ar c'hadoriou a oa bet tapet dezho, hag a azezas. Viktorina hag Ivona, c'hoarezed yaouankañ Sezarina, a lakaas war an daol bara, amann, ur pladad kig yen. Gweltaz, o breur, a oa aet dija war-du ar c'hav en ur hejañ a-bouez e zorn ur pezh picher melen kofek-tev.

- "Hon digarezit, va zud vat, eme Vari-Anjela; met kompren a rit n'hellomp ket choa da zebriñ d'an eur-mañ. Emaomp o paouez sevel diouzh taol, koulz lavarout". Holl dud an ti avat, a savas o mouezh, hag an ostizidi o c'houzout mat n'heller dinac'h, roñs ar seurt kinnigoù, a demnas o c'hontell eus o godelloù hag a droc'has, kement hag ober van, un tamm bihan a vara hag un tamm kig-sall mogedet.

- "Ne fazian ket moarvat, eme Vari-Anjela. C'hwi eo Sezarina, emezi, en ur sellout ouzh pardonerez Sant-Uned, e miz Eost.

- Ya! me eo, emezi en ur ruziañ un nebeudig.

- Met, eme Vari-Anjela o teurel evezh n'he devoa ket ar plac'h yaouank kemeret ha dilhad kaer, me 'soñje din e tleec'h dont da Gerrien asamblez ganimp ?

- N'ouzon ket avat, ha gallout a ran mont du-hont d'ar gousperoù. Gweltaz a vo eno o terc'hel plas an tiegezh. Emañ o tougen skeudenn ar Werc'hez a-unan gant paotred e oad a zo o paouez erruout er gêr eus ar c'hazarn. Ha neuze emañ koan da azezañ, rak krediñ a reomp e chomot amañ da goaniañ asamblez ganimp."

Teñvalaat a reas dremm ar Seurez.

:" -Ar mestr a raio evel va karo, emezi. Evidon-me, ne vefen ket dinec'h ma renkemp bezañ war hent an distro diwezhat en noz. Anaout a ran ar mevel; ne badfe ket, ha barrek e vefe da zont d'hon diambroug... Alo ! Sezarina, gwiskit ho tilhad kaer, ha deuit ganimp da brosesion Itron-Varia 'n Hollsikour.

- Na rez ket komplimantoù, va merc'h, eme Yann an Tenou. Tremen a ra an amzer. Poent eo pignat war-du Kerrien. Barrek eo da c'hoarezed d'ober al labour." Hag o treiñ da gaout Per : "Neuze ez eo intentet-mat : chom a reot da zebriñ un tamm soub ganimp pa viot o tont d'ar gêr eus ar pardon."

Ha keit ha na oa ket ar Seurez war al lec'h, o vezañ ma oa aet d'ar sal e-kichen gant Sezarina, e c'hellas Per respont sklaeroc'h ha muioc'h dinec'h : - Ne vefe dereat dimp ober displijadur deoc'h, emezañ prederius a-walc'h, met arabat deoc'h ober frejoù abalamour dimp!

- Evit-se, eme unan eus ar merc'hed yaouank, e c'hellit bezañ didrubuilh. Ober a raimp eus hor gwellañ, hep klask fichañ ur goan e-giz ma vez graet en otelioù. Ne vefemp ket barrek d'ober !"

Neuze e troas ar gaoz war draoù all, met na badas ket pell, rak an nor ma oa aet drezi Mari-Anjela hag an hini henañ eus merc'hed an Tenou a addigoras hag a

lezas an div blac'h da dremen. Mari-Anjela en em ziskouezas gant hec'h abid kar-meziadez-ar-bed. War he roberm serch du, e splanne ar chal hag an davanjer wemm; war he c'hoef, izel al lorikennoù anezhañ, he devoa taolet ur ouel tul du hag a ziskenne un nebeudig izeloc'h eget he bandenn. Sezarina an Tenou avat, he devoa gwisket ur chal gwer gant pempilhoù eus ar memes liv outañ, hag un davanjer satin melen-du. War he blev rannet dre ar c'hreiz e oa ur c'hoef gwenn-sign gant ur ro-zennig broudet gant an dorn ouzh ar foñs anezhañ, hag un dantelezhenn woan war ar bordoù.

Sevel a reas Per en e sav hag oc'h astenn e zorn da vestr an ti : "Kenavo emberr, emezañ, peogwir e fell deoc'h krenn hor c'haout ouzh ho taol. Ez eomp da vont war-raok. Ne garfe ket Mari-Anjela koll lodenn ebet eus ar Gousperoù!

- Nann, sur ! a lavaras groñs Mari-Anjela; dreist-holl un deiz evel hemañ... Sellit ouzh ho Montr ha na rit ket dimp en em gaout diwozhat. Ur skouer dispar e vefe a-berzh unan hag a zo en trede Urzh Itron-Varia-Garnez !

- Bezit dinec'h. Bez' e viot e-tal dorioù ar chapel kent na vo bet tintet ar c'hloc'had diwezhañ a-raok an ofis. Gant ur gazeg evel hon hini ! Klask a raio tremen an holl gezeg all. Paon am bezo ouzh he derc'hel ."

Klevout a raed trouz ar gweturioù o terc'hel hep paouez da dreuziñ kêriadem vihan Sant-Salver Uhelañ. Bez'e oa tud da vezañ e Kerrien, an endervezh-se. Prest e oa ar bardonerion. Brieg hag en devoa taolet evezh ouzh ar gaer a gazeg louet a yeas d'he distagañ hag a zegasas ar wetur dirak an nor: "-Dont a rit ganimp evel just, eme Ber Aodren, pa'z oc'h eus ar gouel ivez ?

-Trugarez deoc'h, eme ar paotr yaouank. Kemerout a rin an hent treuz da vont du-hont. Bez'ez eus daou ganarad din o chom en hanter ar c'hraev. Divizet ez eus bet etrezomp e c'halvfen anezho pa dremenfen dirak o zi. Abred a-walc'h e vimp evit klevout gervel ar re o deus lakaet o anv da zougen ar Skeudenn. Ne hop an Aotrou Kure an anvioù nemet da fin ar gousperoù... Ale ! merc'hed, savit er wetur. Krog-mat ez on e penn ar gazeg, ne raio fiñv ebet ken na vo aet an holl en o c'hoazezoù "

En aner eo e klaskas Sezarina mont a-dreñv da azezañ war ar c'houfr. Ar Seurez eo a yeas da azezañ warnañ, hep goulenñ ali digant den ebet, hag a lavaras ne oa ket a lec'h evit den all, pa he devoa lakaet en he c'hichen ur pezh boked-fleur evit aoter Itron-Varia'nHollsikour.

Ret-mat e voe d'ar plac'h yaouank eta chom e-kichen ar charreter. Ur c'hlaouenn a skoas e he c'halon, ma teuas he divjod da vezañ ruz, hag e hastas buan kuzhat al liv-se en ur sankañ he bizaj en ur mouchouer frondusaet gant dour-Kologn. Per a hejas ar reñjenn. Bichetenn a savas he fenn, a droñsas he fronelloù, a skoas he zreid en douar, hag a zibradas evel un tenn. Hogen daou c'hant tro-rod pelloc'h, daoust d'he c'hoant taer da redek, e renkas brav-mat kemerout he flas er steudad hir a weturioù a dreuze Sant-Salver Uhelañ.

En ur sevel ar c'hraev hir ha serzh hag a vez graet Dougabri eus ar beg anezhi, ez eas al loened d'ar paz. Neuze e savas kaoz etre Per ha Sezarina. Gant plijadur e klevas ar Seurez anezho o komz eus ar Gouel-se eus ar 7 a viz Gwengolo, hag a gendalc'hfe an deiz war-lerc'h, da adkregiñ ha da echuiñ ar sul war-lerc'h. Ober a rae Sezarina ar roll eus al labourioù kinniget gant merc'hed yaouank ar barrez evit kempenn ar chapel ken kaer ha ma oa tu. Dalc'het he devoa soñj eus anv ar Pardoner, ur chaloni eus Sant-Brieg. Neuze e komzas eus an tantad a rafe ar prosesion ur poz dirazañ. Tantad Kerrien ? Lorc'h a oa e tud ar gêriadenn gantañ. Bep bloaz e oa evel un tour fagou-fav uhel. Savet e vez pell-tre diouzh ar chapel, hogozik war lezenn forest Loudieg. Aotrou Person Lanbernez a lakfe an tan ennañ gant ur gouloù benniget, pa vefe echu sarmon ar chaloni.

Met an holl ziskleriadurioù-se hag a oa sañset da blijout kement d'ar garmeziaez devot, perak eta ne zeuent ket a-benn da dennañ hec'h holl evezh? Soñjoù hag a glaske-hi diarbenn evel dañjerus evit he devoasion, a zalc'he d'en em silañ en he spered, kement ha ken bihan ma oa tregaset mui-ouzh-mui ganto... Bremaik, Per, goude bezañ disterniet ar gazeg hag he lakaet en ul lec'h fresk pell diouzh ar c'helion, a dennfe e veluzenn kuit hag a zeufe d'en em lakaat er renkennadoù en em c'hra anezho o-unan koulz lavarout, a bep tu d'an hent, kerkent ha ma vez prest ar prosesion da loc'hañ. Hen gwelout a rafe gant e zilhad griz-teñval er devoa lakaet ober teir sizhun a oa, e ti ur c'hemener bras eus Roazhon, hag a yae ken mat dezhañ. Met daoust ha dre zoujañs evit santelezh al lec'h sakr eo en devoa en em fichet evel-se?... Daoust ha ne vefe ket kentoc'h ???... Hag ar plac'h yaouank-se ? Tud diwar-dro Kerwenan he gwelfe sur-mat en o c'hompagnunezh kent fin an devezh, ha feiz ! daoust ha ne dafe ket an teodoù en-dro ? Met perak ivez'ta e oa hi chomet hep silañ un ali bennak da Ber ? Pell ac'hano ! Daoust ha ne oa ket aet gantañ da di tud an Tenou ? Ha daoust ne oa ket e-sell da zistreiñ di fenezh a-unan gantañ ?

Ul lamm a reas Mari-Anjela ! Petra ! Daoust hag ur seurez eus trede Urzh ar C'harvez n'he deus netra all da brederiañ warnañ en ur vont da Gerrien, da c'housperoù kentañ Gouel Ginivelezh an Itron Varia ? " Sursum corda ! emezi, war un ton a damall; hag o tennañ he chapeled eus he godell didrousañ ma c'helle e stagas da zibunañ gant devoasion vras " Hon Tad pehini'zo en neñv" ha " Me ho salud, Mari ".

War ar bank a-raok e talc'he Per hag ar plac'h yaouank gant o c'haoz. Da gantañ ne seblante ket ar plac'h yaouank bezañ en he bleud, met tamm ha tamm e voe gwellet o sederaat hag o komz gant muioc'h a fiziañs. Diskouez a rae da vestr Kerwenan anterouer ha n'anaveze-eñ ket nemeur. Reiñ a rae dezhañ da anaout anvioù ar c'heriadennoù hag ar pennkerioù a gleiz hag a-zehoù, ouzh o diskouez dezhañ gant he dorn, hag en ur reiñ ouzhpenn diskleriadurioù diwar-benn ar stuzioù-labourat a gaved ar gwellañ evit an douaroù-pri-se, ha diwar-benn ar seurtoù avaloù o devoa ar muiañ a chañs da zonet da vat enne.



ILIZ PLOUVAEL




CHAPEL KERRIEN




ITRON-VARIA AN HOLLSIKOUR

(taolennoù diouzh luc'hskeudennoù)



FEUNTEUN AR WERC'HEZ
(Ar Gweledigezhioù)



FEUNTEUN SANT GALL

1962



Iliä Lokronen

Ti genidik D.Duchauchix
1943

Kroaz Vreizhek bet adeozet
gant D.Duchauchix

Antre Maner ar
ar Brous

Bered kozh

Mari-Anjela hag he devoa serret he daoulagad e-pad dizenez kentañ he chapel, a lavaras outi hec'h-unan he devoa graet fall ouzh o addigeriñ. Rak addeuet e oa a-daol, evel ur barr-aval, dre he spered ar soñjoù n'o devoa mann d'ober gant he fateroù, ha santout a rae ne vefe ket un ebat poaniañ d'o argas kuit... 'Velkent ha goude ! Re dechet e oa ar Sezarina Tenou-se da vinc'hoarzhin... Evel just, n'helled ket tamall dezhi sellout eeun ha didroidell evel ma rae, met perak ne blege ket gant furnez ha modestiz malvennoù he daoulagad pa gomze ouzh Per ? Gant al leanezed e oa bet koulskoude er skol 'lec'h ma roer d'ar merc'hed bihan kentelioù ken mat diwar-benn an dereadegezh. Pegen skañvbenn ne oa ket eta evit o disoñjal, pe zivergont a-walc'h evit chom a-youl-gaer hep ober diouto ?... Ba ! tremen a rafe an devezh-se ha warc'hoazh e Kerwenan e soñjfed e traoù all estreget e tud Kerojer... Met ar pezh a gonte bremañ e oa derc'hel warnañ evit ma timezje. Met da biv 'ta e tegouezhfe an enor da vont da c'houlenn evit an emzivad a dad hag a vamm, dorn an hini en defe choazet ? Da vaeronez ar paotr yaouank, na petra'ta,- d'ar Jozefina Morev-se hag a oa dimezet d'un den eus kêr, hag a veze o sikour he gwaz gant kement a ampartiz e koñvers ar greun hag an temzioù. 'Alato ! tud onest e oa tud an Tenou, piv a c'hellfe kaout an disterañ douetañs war se ? Met Jozefina Morev, kustum da spilhennañ dornadoù bilhedoù-bank bemnoz, a rafe ur yeuskenn netra nemet o klevout komz eus ur seurt danvez-pried evit he filhor a Gerwenan !

O Mari-Anjela ! Mari-Anjela ! Soñj eta en Aotrou Doue, er Werc'hez Vari , e silvidigezh da ene ! Sursum Corda !

Erruout a reas ar charabañ en ur c'hroaz-hent. War an tu dehoù e oa da vont. Ur c'hraev sonn-sonn da ziskenn, ha neuze ur c'hrec'h ken sonn all da sevel, en tu all da wazh Doullan, hag e tegouezhfe ar bardonerion er geriadennig dister, stok el lec'h ma oa bet paret ar 15 a viz Eost 1652, ur vesaerez 12 vloaz bouzar ha mut a-viskoazh, Jened Kourtel, gant un Itron gaer gwisket gant satin gwenn, hag a oa en em ziskouezet dezhi e-kreiz ur sklerijenn eus ar flourañ.

Amañ avat, e kreskas steudad ar gweturioù gant an niver bras a weturioù all o tonet eus hent Loudieg, ha ret-mat e voe derc'hel start ar reñjennoù evit diwall na zegouezhje gwall-zarvoud ebet.

Dirak gwetur Kerwenan e ruilhe bremañ ur c'harreoz bras louacherezh , un dapisiri, ma oa berniet enni gant o div renerez, merc'hedigoù hag a zouge spilhennet ouzh o c'horfenn un arouezig vetal gwenn, e-pign ouzh ur seizenn c'hlas, arouez ur patronaj diwar-dro. En ur pleg eus an hent, war an dosenn ragenep, e tarzhas a-dreuz delioù ar gwez beg un tour mein-glas, ha tro-war-dro stlabezet amañ hag a-hont e-touez gwagennadoù ar gwez-avaloù hag ar gwez-derv, un hanter-dousem diez-feurm. Un anv lavaret hag adlavaret kreñv-meurbet, a savas eus ar c'harreoz": Kerrien! Kerrien !"

D'an empoent e tremenas son ur c'hloc'h a-us d'an hent :
- Kentañ kloc'had ar Gousperoù, eme Sezarina an Tenou."... Merc'hed bihan o arouezig vetal gwenn, a stagas da ganañ : " Ave Maris Stella, Dei Mater Alma !..."

Ha Mari-Anjela, krog he c'halon da virviñ, a daolas gant ur vouezh tomm ar gouvi-
adenn-mañ : " Kanomp ni ivez, va merc'h, kanomp gant ar merc'hedigoù mat-se !".

A-benn an eil poz eo'h unanas an div vaouez o mouezhioù gant ar ganadeg a
darzhe eus ar c'harrez :

Sumens illud Ave
Gabrielis ore...

+
+ +

Sioul e oa an noz. Sklaer al loar, un dudi, a-us d'ar maezioù, ha ken gwenn
he gouloù m'ho pefe touet e welec'h erc'h war an toennoù hag ar parkeier. Unnek eur
a sonas e tour Plouvael a oa a-drek kein ar bardonerion a-benn neuze. Per, huñvreüs,
a leze ar gazeg da vont d'an drot vihan. Mari-Anjela a zeuas un huanad ganti :

- Ur goan evel-se !.... Dav e vo dimp he pentiñ dezho.

- Setu end-eeun ar pezh a soñjan va-unan, a respontas berr-ha-berr ar paotr yaouank.

- Daoust hag ho pefe soñjet en ur seurt tapadenn pa'z omp bet en em gavet en o zi ?

Ne oa netra o tiskuilhañ ar pourchasoù o devoa graet. Ha Yann an Tenou ouzh hor pediñ
da zebriñ un tamm soub, pa vijemp war hent an distro eus ar pardon ... Gwir eo ez eus

bet soub, met goude..." Hag ar Seurez d'ober ar roll eus an holl veuzioù a oa bet

degaset a bep eil war an daol : andouilh gant yod-patatez, kefalenn-gonikl, poñsin

ouzh ar ber, koavonaj dre gafe, gwestell, frouezh. Lakit ouzhpenn gwin gwenn ha gwin

ruz..."- Neuze ez it da skrivañ dezho dont ? Petore deiz a ginnigot dezho dont ?

- Me'oar -me ?... Deoc'h-c'hwi ez eo kentoc'h lakaat an deiz.

- Va lakaat a rit nec'het. Tremenet ez eo an holl ouelioù. Disul emañ Pardon Itron-
Varia-Dertignon, met re dost eo.. Diwezhatoc'h...

- Diwezhatoc'h emañ pardon Sant Lin..

- Ya! an hini diwezhañ eus ar pardonioù, ar sul diwezhañ a viz Gwengolo. Ya, met pell

emañ Sant-Lin eus Kerwenan. C'hwi'oar pelec'h emañ Sant-Lin ? En tu all d'ar Menez

, war-bouez nebeut war harzoù Sant Vran ha Sant-Yegu. Kaer he deus Bichetenn kaout

divesker mat, ez eus ezhom amzer evelkent da vont di. Nann ! n'hellit ket o c'has

da C'housperoù Sant-Lin.

- Daoust ha ret-mat ez eo kaout un degouezg bennak diouzh se evit o fediñ ?

- N'eo ket sur ! Met neuze e seblanter o fediñ abalamour d'o fediñ ha netra ken...

Sellit ! Dont a ra ur soñj din em spered. Ra vo meulet Itron-Varia-'n Hollsikour !

Skrivit dezhe dont da gerc'hat avaloù-mir. Henozh e klemment dre n'o devoa ket ava-

loù evel-se, koulz lavarout. A-benn teir sizhun amañ e vo mat avaloù-renetez ar

C'hloz-bras da vezañ kumtuilhet. Lavarit dezhe pouchas mannioù bras. Avaloù evel-se
e vefe pec'hed o lakaat e seier.

-A-benn peseurt deiz e vefe neuze ?

- Gortozit'ta... An eil sul a viz Here. Ket ar sul kentañ peogwir emañ Pardon Itron-
Varia'r Rozera ,an deiz-se. Ne garfen ket mankout prosesion ar Gousperoù, evel just !

- Mat eo ! intentet eo a-benn an eil sul a viz Here. Hepdale e kasin ul lizher dezhe."

Anezhi hec'h-unan he devoa ar gazeg kuitaet an hent bras ha kemeret war an dorn dehoù ar rabin kistin ha fav. Klevet e voe un harzhadenn laouen : ar c'hi hag en devoa klevet trouz ar charabañ a oa deredet da ziambroug e vistri. E toull ar porzh edo ar mevel bras o c'hortoz e zaouarn en e c'hodelloù :

"- N'oc'h ket abred, emezañ. Krog e oan da vezañ nec'het. Bezañ war an hentoù bras da hanternoz nemet kard pe nemet dek !...

- N'eo ket dre hor faot, paour-kaezh Maodan, eme Vari-Anjela. Se n'eo dre faot den ebet, evit lavarout ar wirionez. Aet e oamp da welout mestr ar Vailhenn, ha feiz ! pa'z omp erruet eno...

- Tap krog e brid ar gazeg, a droc'has ar mestr. Mir outi da fiñval e-keit ha ra vimp o tiskenn. Santout a ra c'hwez ar marchosi, ha c'hwez ar c'hezeg all a ra dezhi bezañ nervennek.

Ar Seurez a daolas he zroad en douar hag a reas tremen dezhi ar baner 'lec'h m'he devoa adlakaet e Kerojer hec'h abid wenn.

"- Daoust hag ezhomm hoc'h eus e vefe aozet un dra bennak deoc'h da zebriñ pe da evañ ? a c'houlennas ar vacuez vat digant Per Aodren.

- Dalc'het em eus tomm ho koan deoc'h ho-taou, a lavaras Maodan raktal. It d'ar gegin. Me'soursio eus ar gazeg evit he distagañ hag he boueta.

- Me, eme Vari-Anjela, a ya d'am loj diouzhtu. C'hoazh em eus pedennoù da lavarout, hag emañ hanternoz o vont da seniñ."

Seurez an Trade-Urzh a savas ar viñs prim-ha-prim, ha kerkent e voe gwelet gouloù en he c'hambri. Daoulinañ a eure dirak un daolenn eus Itron-Varia-Garnez sternet gant ur pezh chapeled hir, tev ar greun anezhañ, bet degaset eus a Lourd, ha stummet en-dro d'an daolenn e-giz ur galonenn; hag e lavaras un dizenez chapeled, ha neuze ar Salve Regina hag an De Profundis. Ha pa savas, e kempennas, kent en em astenn ennañ, he gwele a zalc' e-hi kalet abalamour da gemerout perzh un tammig e pinijennoù he c'hoarezed Karmeziadezed eus an Urzh Vras; hogen e-lec'h en em ziwiskañ ec'h en em lezas da gouezhañ en ur gador-vrec'h a oa fellet groñs da Bêr lakaat en he c'hambri, ha n'he devoa-hi biskoazh c'hoazh pleget d'en em servijañ anezhi.

- Mar deo youl Doue, emezi... Ya ! ret eo din krediñ ez eo youl Doue. En em gavet ez int war hent Sant-Uned, hag e-skeud chapel Gerrien eo o deus komzet an eil gant egile. Va Doue ! ho polontez bezet graet..."

Oc'h echuiñ ar gerioù-se, daoust perak ec'h en em gave skuizh, ken skuizh ha ken trist ? Adstagañ da gomz outi hec'h-unan-" Ya! evel just, ne oan ket deuet emañ nemet evit ur pennad-amzer. War echuiñ emañ va c'harg. Soursi ebet pelloc'h gant traoù ar bed, evel m'am eus dalc'hmat e Kerwenan. Va holl breder e vo labouret d'en em santelaat, hag ezhomm bras am eus..."

Daoust d'an abegoù devot a roe dezhi hec'h-unan evit degemerout a galon vat ar cheñchamant a ouie a-walc'h ec'h en em gavje en he buhez kent pell, ne baeuze ket Mari-Anjela da santout ur bec'h ponner war he spered. Donet a reas dour war he

daoulagad. Stourm a reas hag e teuas a-benn da voustrañ war he daeroù.
 "-Bezañ er em staget kement-se outañ ? emezi ouzh en em damall hec'h-unan. Daoust ha
 n'eo ket sachañ warnon warnon va-unan konnar an Aotrou Doue ? Ur Seurez n'he deus
 droed ebet d'en em lezel da vezañ gonezet evel-se gant karanteziou eus an douar...
 Gwir eo e oa dleet din bezañ ur vamm evitañ. An Aotrou Person e-unan en deus bet
 komzet er stumm-se, an deiz m'en devoa va c'haset da Gerwenan. Bezomp mamm eta, be-
 tek ar penn, ha soñjomp hepken en em aberzhiñ evit ma vo eürus Per...

D'an ampoent e teuas da soñj dezhi eus ul luskellerezh he devoa klevet ur
 vamm eus ur geriadennig diwar-dro o kanañ, ur vamm anezhi ha na fazie ket war ar
 pezh en em gav gant an holl vammoù a-benn ar fin. N'he devoa dalc'het soñj nemet eus
 ur poz hepken hag a adlavaras a-vouezh-lezel :

Daoust ha 'vidomp-ni 'z eus eurvad ?

:" Kan'ta noz-deiz 'n ur luskellat.

Sav da baotrig: ur verc'h 'zeuio

Hen laero d'hen karout d'he zro ."

An dro-mañ e oa re vras ar galonad. Santout a reas ar vaouez kaezh an
 daeroù o redek war he divjod, hag e tapas buan-ha-buan he mouchouer-godell da vou-
 gañ an difronkadennoù a save stank-ha-stank eus he c'hreiz da doull he gouzoug hag
 a rae d'he brennid krenañ ha darlammat.

Da c'hras Doue, ur soñj a zeuas war he spered hag he frealzas : " En ñ ivez,
 va Ferig kaezh, en deus karantez evidon. Ur wech ar bloaz e pok din-me, deiz ken-
 tañ ar bloaz diouzh ar mintin. Evel d'en em zigareziñ e lavar : " Hiziv ez eo per-
 metet pokat d'an holl dud, seurezed ha tout !". Ha n'eo ket dre zereadlegezh hep-
 muiken e ra diouzh giz ar vro war ar poent-se. Dre garantez wirion an hini eo. Va
 stardañ a ra start-meurbet war boull e galon hag e laka e jod tre war va hini..
 Va Ferig, va faotr, n'am ankounac'haio ket, ha war degouezh trubuilh gantañ un deiz
 bennak, ha war en devez ezhomm da zivec'hiañ e galonad, ez eo diganin-me, deuet en-
 dro da vezañ Seurez Paz-Rousel, e teuio da glask frealz ha konfort en e anken."

Klevet e voe un orolaj en noz o skeiñ un taol. Sevel a reas Mari-Anjela
 he fenn. Pet eur a c'helle bezañ ? Hanternoz hanter ? Kentoc'h un eur dicuzh ar
 beure. A dra sur, e oa aet Per hag ar servijerion d'o gweleoù. Trouz ebet ne gleved
 mui e Kerwenan. A dra sur, ne oa nemet he c'hambr a gement a oa gouloù enni c'hoazh.
 Sevel a reas ha tapout diwar ar siminal ar vured bet karget e feunteun Sant-Uned .
 Diskenn a eure un nebeud takennoù eus an dour santel en ur werenn hag o meskas gant
 dour fresk. En ur gas an evaj d'he muzelloù e huanadas : " Sant Uned, grit din ad-
 kaout ar peoc'h, ha ma teuio ar c'housked... Kement a draoù a verv em fenn paour !...
 Ma ne zeuit ket d'am sikour, e tarzho an deiz ha n'am bezo serret lagad ebet !"

En em ziwiskañ a reas buan ha lazhañ ar gouloù. Astennet war he gwele ,

e serras he daoulagad hag e klaskas adgwelout Skeudenn Itron-Varia'n Hollsikour ken
neurdeus ha ken dous ha ma oa en em ziskouezet dirak he daoulagad, pa oa deuet dreist
treuzoù ar chapel da heul ur prosesion hir gant bannieloù ha drapoioù a-bik a-us da
bennoù an dud, ha pa oa aet dre greiz ar bobl, douget war zivskoaz galloudus pevar
labourer yaouank diwar-dro.

+
+ +

Pevrazek miz da c'houde e oa eured Per Aodren ha Sezarina an Tenou. Kent
ober an eured e oa bet gortozet ma vije bet graet ar jistr nevez kentañ. Un eured eus
ar c'haerañ e oa bet. Ha bloavezhioù ha bloavezhioù da c'houde, e oa bet komzet anezhi
en neza degoù etre an Nnian hag ar Ster Vras. Nebut goude ma oa deuet an dud eus an
iliz, e kemerjod hent Kerwenan. Ret e oa gwelout ar regennad gweturioù ha charabañioù;
gant kanapuenoù o sevel eus an holl weturioù-se. A-hed an hent e voe graet meur a
chan dirak toull-dor an ostalerioù, ha kerkent neuze e haste buan an dud yaouank
diskenn d'ober un dro-zañs. N'eo ket binvioù-muzik eo a vanke da eilañ an dañsoù. Evit
an dañsoù-tro hag an derobeoù, e oa ur sac'h-binioù hag ur vombard skoazellet gant
un taboulin hag ur pif, hag evit an dañsoù nevez :ur violoñs hag un akordeoñs.

Div eur goude-kreisteiz a oa o seniñ p'en em gavas penn an ambrougadeg e
toull ar rabin-gistin a gas da borzh Kerwenan. Divizet en devoa Per ez eo ar Seurez,
ha den all ebet nemeti, a gement a rafe enor an "degemer mat d'ar wreg yaouank".
Edo Mari-Anjela o c'hortoz e-tal ar gloued digor-frank. Pokat a eure da Sezarina pa
ziskennas homañ eus ar wetur hag e kinnigas dezhi un tamm gwastell hag un hanter-
werennad-win, ha neuze o tapout krog en he dorn e kasas anezhi d'an ti tlec'h ma oa
en em vodet, pres warno, kerent an ozhac'h nevez :un eontr dezhañ giz Breizh, ha tri
c'henderv pell. Pokat a eure ar wreg yaouank dezho holl, gant ar barfetiz a zere ouzh
al lid-se, hag e kinnigas dezho ar gwin hag ar wastell. Neuze e voe tostaet dezhi
ur gador hag ec'h azezas ouzh an daol evel ma tlee hen ober, hervez ar c'hustum, da
verkañ e teue da vezañ mestrez an ti. Ne badas ket pell an traoù. Kerkent ha ma oa
bet evet gant ar re a oa en ti ar bannac'hig gwin diske net dezho en o gwerenn gant
ar wreg nevez, e savas homañ hag o fediñ a reas da vont d'he heul; hag evel-se, kom-
pagnunekaet gant he c'herent nevez, ez eas er-maez da bediñ an dud da vont ouzh taol.
Kempennet e oa bet ar c'harrdioù evit degemerout ar gouvidi, met ne oa ket bet tu da
lakaat enno taolioù a-walc'h evit kement all a dud : un tri-c'hant bennak anezho.
Ar re yaouank a zebrje er porzh. Ne vije ket fall eno. Klouar e oa an amzer, hag evit
n'en dije den ebet da glemm war voestijenn an douar, Per en devoa graet freñjañ
dindan an taolioù pezhioù sac'hadoù brenn-heskenn degaset an deiz a-raok eus ar vilin
-heskenn nesañ.

Ober a reas Sezarina sin d'ar sonerion da devel, ha gant ur mousc'hoarzh
e reas ur jestr-tro-war-dro d'an holl, hag ez eas war-du "taol ar wreg nevez". Ti
kozh Kerwenan en devoa kavet bremañ e vestrez-tiegezh.

" Hañvig Foar an Nec'h ", ar bloaz-se, a voe dispar an amzer anezhañ a-hed ur sizhunvezh penn-da-benn, ar pezh a rikouras merc'hed Kerwenan evit difoarañ eus ar c'hoüez bras goude an eured. Bez'e oa lienaj da gannañ, da verviñ, da waskañ, da deurel er-maez. Soñjit 'ta : tri devezh e oa padet ar gouelioù hag an c'batoù. Miret he devoa Sezarina he c'hoar Viktorina ganti da reiñ un taol-dorn dezhi, ha Mari-Anjela he devoa goulennet ar c'hannerezed ordinal da zont. Bremañ e oa sec'h ha naet pep tra. Feriñ, plegañ edod oc'h ober hag o renkañ an traoù er presoù.

- " Viktorina, eme soudan ar vestrez-tiegezh nevez, deus amañ 'ta da reiñ un tamm sikour din, mar plij. Deomp da gas ar vanniad traoù-mañ d'ar sal vras." An div c'hoar a dapas krog pep hini en un dorn eus ar vamm a oa leun a dorchoueroù, a doubieroù hag a serviedennoù, hag e tremenjont eus ar gegin 'lec'h ma veze graet al labour, d'ar pezh e-kichen. E-keit ha m'edont o poanial da renkañ al lienaj er pres-derv ledan, mouladurioù giz Loëiz XV warnañ, e troas Viktorina war-du he c'hoar, hag e lavaras dezhi sioul-sioul evel pa vefe o kontañ ur sekred bennak dezhi :

- " N'ac'h eus ket taolet pled ouzh ar pezh he deus graet Mari-Anjela, e-pad an deiz, e-keit ha m'edo ouzh hor sikour ?

- Eo! taolet em eus pled ivez.

- Ur seblant fall evidout !

- Poan am eus o krediñ, met ret eo din reiñ da c'houzout da Ber, kement hon eus gwelet hon-div. Fenozh e lavarin dezhañ.

- Gallout a rafes komz outañ diouzhtu. Emaon o paouez hen gwelout oc'h erruout er porzh."

Sezarina a zigoras ur prenestr hag a reas ur sin didrouz d'he gwaz. Hag he-mañ da dostaat en ur vourc'hoarzhin, hag o tont d'en em harpañ ouzh barlenn ar prenestr.

"- Per, eme ar wreg yaouank, daoust ha n'az pefe ket cheñchet menoz diwar-benn ar Seurez ?

- Tamm ebet !

- Met daoust ha diskleriet ac'h eus dezhi petra hor boa divizet diwar he fenn ?

- N'em eus ket c'hoazh... Met perak ez eo ken trist-se da benn ?

- Feiz ! sell ! Mari-Anjela he deus dibabet he lienaj a-douez hon hini. Hec'h holl lienaj...

- Dibabet ? Ma n'eus nemet se ! N'he gwelan ket o kemerout hent Paz-Rousel evit-se !

- Ne vern, trubuilhet 'on gant se.

- Bez didrubuilh... Warc'hoazh vintin abred, e tegouezho ar vasonerion amañ da stagañ gant al labour... N'ez ket da gemerout poan-spered.

- Va Doue ! gant na refuzo ket !

- Mari-Anjela a zo dleet dezhi chom Seurez Kerwenan. Laosk an traoù-se war gont da bried... Ma ! pebezh souezhadenn vras ne vo ket eviti !..."

Antronoz vintin ne oa ket echu o dijuniñ gant an dud, er goumanant, pan antreas er porzh ur wetur hag a oa skrivet warni anv un embregour labourioù-masone-rezh eus Loudieg. Tri den a ziskennas diouti. Tostaat a reas unan anezho betek toull-dor ar gegin.

"- Demat deoc'h, Aotrou Kadoret, a daolas seder ar wreg yaouank hag a oa deuet dave-tañ. Stagit ho loen-kezeg ha galvit ho tud da zont en ti. Diskargañ a reot goude ho pinvioù hag ho sac'hadoù-raz; met deuit ouzh taol ho-tri, ha pa ho pezo debret un tamm boued e roio ar mestr e urzhioù deoc'h."

Met ar mestr ? Pelec'h edo ?

Evit hen kavout, n'hor bezo nemet mont er-maez, hedañ tu kleiz ar porzh, ha tremen dor " an Ti-Forn kozh ", ul lojeiz bihan anezhañ, savet distok diouzh ar pezhioù-lojeiz all, hag ennañ daou bezh a-rez-douar. Eno e veze meret an toaz he poazhet ar bara gwechall. Abaoe pell'zo ne servije ar forn da netra ha goloet e oa ar volz anezhi gant iliaev. Bremañ e talvez e an "Ti-Forn kozh" da di-diskarg; eno e veze taolet ar barrikennoù didal hag ar binvioù aet 'maez a implij. Un dek murud bennak a oa, pe ouzhpenn zoken, edo Per eno. Daoust hag evit kuzhat e nec'hamant hag e esmae eo e komze ken prim-se ? Mari-Anjela a selaoue, gwenn-disliv he dremm, en he c'hoazez war ur c'hased, hag he daouarn juntret ganti war bennoù he daoulin. " Ober a rin izelaat mantell ar siminal ; re uhel ez eo hag ez a kalz re a domnder da goll. Joausoc'h e vo un nor werennet ha sklaeroc'h e vo ar pezh evel-se. Petra' vennit kaout dindan ho treid ? Simant pe goad ? "

Ar Seurez a zeuas ganti en un huanad dister un nebeud geriennoù na voe gallet intent nemet ar fin anezho : " Per, va faotrig bihan ! "

"- Yen eo ar simant ha ma tiflip tra pe dra eus ho taouarn, ez eus riskl dezhañ da derriñ. Ez an da lakaat ober deoc'h ur pleñchod kistin mat. N'eo ket plenken eo a vank dimp. Bez'ez eus darn hag a zo o sec'hañ, tremen dek vloaz'zo war dreustoù ar c'harrdi."

Sammet gant ar bec'h bras a oa war he spered, e talc'he Mari-Anjela da gas he selloù war ar mogerioù ha war an douar, hag e weled trefu hag aon en he daoulagad. Hi hag a oa abaoe tost da c'hwec'h vloaz 'oa o c'hourc'hemenn ober kement tra a veze graet, ne gave ger ebet da enebiñ ouzh urzhioù ar mestr pe da zisvankañ enno... Dont a rae da wir eta, an huñvre he devoa nijet ken alies dre spered kement all eus ar Seurezed pilpavez-se dilorc'h ha devot : kaout dezho o-unan, e-skeud o zi-familh ma c'hellfent derc'hel da gemerout perzh er standur anezhañ, ur peniti a netra 'lec'h ma c'hellfent gwriat, ober stamm, enkardiñ gloau, ha nezañ en ur ganañ kantikoù, plediñ da eurioù merket gant ar bedenn a-c'henoù hag a-galon, ha lec'h ma c'hellfent ivez diskour deskiñ o relijion d'ar vugale diwar-dro. Ha Mari-Anjela a wele dija en-dro d'an oaled kozh duet ar vein anezhi gant ar maged, hag a oa da vezañ yaouankaet gant ar vicherourion, un hanter-gelc'hiad a baotredigoù hag a verc'hedigoù lodren o tigeriñ o divskouarn da selaou an danevelloù a demfe evito

24.

eus an Istor Santel hag eus Istor an Iliz. N'eo ket he breur eo en dije gallet pourchas dezhi ur seurt lojeiz. Re baour e oa e-unan, re enk ha re vihan e di. Daoust hag e c'hellfe reiñ dezhi zoken ur gambr dezhi hec'h-unan, en he c'hozhni ?

An " Ti-Forn kozh ", evel m'emaomp o paouez lavarout, a oa ennañ daou bezh hag etrezo ur voger gant un nor breñvedennet er c'hreiz anezhi. An nor-se a oa da vezañ skarzhet kuit ivez. Per, faeüs, a roas un taol-bount dezhi hag a yeas en eil pezh; an deiz a-raok e oa bet tennet kuit ac'hano tri lapin hag a veze laosket eno en o frankiz :

" Deuit'ta, Mari-Anjela!" emezañ.

Gant jestroù ur mekanik ez eas ar Seurez da heul ar mestr, betek toull-dor ar penn strizh anavezet mat ganti :

- Amañ ho pezo ur sal tomm-mat e-kerz ar goañv a drugarez d'an dommerez an eus goulennet da brenañ da lakaat amañ. Ret eo deoc'h kaout ur sal da zegemerout tud bremañ ma'z oc'h superiorez Seurezed Itron-Varia-Garmez. Amañ ho pezo frankiz a-walc'h da vodañ ho seurezed en-dro deoc'h, d'ober ho lennadegoù asamblez, ha da gomz diwar-benn kudennoù ho preuriez vihan !"

Per gant e zorn a ziskouezas un toull er vogerenn a-dal d'ar prenestr a skoe war ar porzh:

- Va soñj, emezañ, ez eo kreskiñ an toull-kazh-se ha reiñ dezhañ ment ur prenestr bihan, ya, ur prenestr bihan o vezañ m'eo troet war-du' ar c'huzh-heol, rak evel ma ouzoc'h, pa vez troet an amzer d'ar glav...."

An dro-mañ e kavas da Vari-Anjela e tlee enebañ:

- O ! Per, perak an dispignoù-se ? " a c'houlennas-hi, izel he mouezh.

- Evit n'ho pezo ket ezhomm da vont er-maez evit an oberenn-se a zevosion hag a rit anezhi " va bizit eus a-bell d'ar **Sakrament** "...Bemnoz da guzh-heol ez it da zaoulinañ e penn al liorz, en arroudenn-se toullet dindan ar skavenn vras...Amañ e vo kalz bravoc'h deoc'h, ha gwelloc'h plaset e viot...Sellit hoc'h-unan."... Per a lamas kuit an dornad-plouz a oa o stoufañ an toull :
"Sellit'ta, Maria-Anjela !"

Tostaat a eure ar Seurez d'ar vogerenn hag e harpas hec'h ilinoù en ur grenañ, war bord ar c'harrezad-sklerijenn-se. Petra'welas ?...

Dreist dresenn (garzh) al liorzha hag ar Pradoù stag outi, war hed seizh pe eizh kant metr diwar-nij, a-us d'an toennoù ha d'ar gwez, tour moan an iliz-parrez, an tour ma save davetañ birvidikoc'h he fedenn, da fin an devezhioù-se - kalz niverusoc'h eget ar re all !- ma oa bet miret gant al labour ouzh ar plac'h devot, da vont d'ar vourc'h da dremen treuzoù ti-Doue..

Per Aodren en devoa soñjet e pep tra, e pep tra...Fromet-meurbet e oa Mari-Anjela. Distreiñ krenn a reas da gaout ar mestr, hag he daoulagad karget a zaeroù a glaskas e zaoulagad dezhañ e-unan; ha neuze e juntras he daouarn, hag ouzh en em c'houlenn hag-eñ ne rae ket marteze ur pec'hed bennak e lakaas anezho war vruched ar paotr. Poan he devoa o kaout hec'h alan, ha ret e voe dezhi strivañ da vat a-benn distagañ an tri ger-se a leunie he c'halon ha ma sante e ranke o lavarout anez mougañ:

- Va faotrig bihan !".

Per a dapas etre e zaouarn-eñ, an daouarn-se ha na labourent nemet dre garantez hep muiken e Kerwenan, hag e waskas warno gant douster. Fellout a reas dezhañ, da heul an testeni-se a deneridigezh, lavarout ur ger bennak d'en em zid'mall. Ar gerioù-se hag en devoa gwelet spis en e spered, a dec'has kuit a-greiz-holl, hag ur silabenn hepken; e-giz trouz un difronkadenn, a zassonas en "Ti-Forn-kozh "

- Mamm !

Dom Duchauchix - Ronan Kermene
(Brezhoneg gant Klerg)

= = = = =
= = =
=

STAGADENNIG

KERRIEN : KREIZENN DOUARDNIEL BREIZH EN HE FEZH

*

E-kerz an hañv, e 1952, e oamp aet da Gerrien, e Lanbernez, a perc'herinded, da geñver Gouelioù trede Kantved Emziskouezioù Itron Varia an Hollsikour. Eus a Lokronan ar Porc'hoed e teuemp, 'lec'h ma z eus ivez ur santual dediet abaoe kantvloazioù d'ar Werc'hez Vari - Itron Varia Gurunennet- e Tertignon, hag a voe darempredet da vat kent 1789. Ur bloavezh kentoc'h, hor boa taolet pled e oa bet graet, diouzh an deiziad kizellet warni, ar gador-brezeg e chapel ar geriadenn-mañ, er bloaz 1652. Kement-se a ziskoueze pegen birvidik e oa bet an devosion d'ar Werc'hez en daou du d'ar Menez, er XVII-et kantved, ha dougetoc'h a se e oamp bet d'hec'h adkavout e Gouelioù-an-Eñvor, e Kerrien.

E-pad al lidoù hor boa taolet hor selloù tro-war-dro ha daoust ma'z eo strizh a-walc'h an dremwel- en askont d'an tosennoù a vir ouzh an daoulagad da dizhout un dachenn ken frank hag an hini a c'heller gwelout diwar gribenn Menez Belaer, pe diwar lein Krec'h Yann Angilh, da skouer- e kave dimp e tapemp e gwirionez betek harzoù pellañ Breizh. Ma paras dirak hor spered, evel dre ur seurt gweledigezh, edomp e kreizig-kreiz ar Vro hag e oa bet dibabet a-ratozh-kaer gant ar Werc'hez Vari al lec'h-se teiraroueziek : arouez Unvaniezh ar Gelted, da gentañ, rak en em ziskouez a reas ar Werc'hez tost d'al lec'h m'edo an-ti-bedif savet gant an Iwerzhonad Sant Gall; arouez ha skeudenn Unded Vreizh, hag hi divyezhek, rak Kerrien hag ar vro tro-war-dro evito da vezañ gallek an deiz a hiziv, o deus anvioù o tegas da soñj e oa brezhonegerion o chom eno gwechall; ha neuze arouez e-keñver douaroniezh, ma oa al lec'h tre e kreizig-kreiz Breizh.

An noz-se end-eeun, e fellas dimp ~~aprouiñ~~ war ur gertenn-douaroniezh kenskeuliet ~~bres-tre~~ ha gwir e c'helle bezañ ar goulakadur-se diwanet en hor spered. Ne oa netra, diouzh ar sell kentañ, a gement a c'helle diskouez edo ar wirionez ganimp. Ne vern! Tresañ a rejomp ar pevar ahel o palefarzhañ Breizh: Hanternoz-Kreisteiz eus Bae Sant-Brieg da Wened, Reter-Kornog gant penn an ahel e beg Ledenez Kraozon, en tu ar C'hornog. Neuze Biz-Mervent eus Bae ar Fraenez da Vae

An Intel, Gwalarn--Gevred gant penn an ahel en Ingrand, diouzh tu digoroc'h ar vro m'eo tu ar Sav-Heol. (*)

Ur bam ! ar pevar ahel-se a geje dres e Kerrien. Souezhus eo ! ar muzulioù-se a glote neket gant bevennoù Breizh, an deiz a hiziv, met gant tachenn Breizh ez-klok, enni inizi ar Minkier ha kreisteiz ar Selun bet distaget diouzh Breizh war-dro ar bloaz 950, daoust d'o anvioù keltiek-rik, neuze ar riblennad-douar strizh er Sav-Heol betek harzoù ar rann-dour (merket splann evel gwir harzoù ar Vro gant gweledigezhioù ar Werc'hez e 1871, e Pont-Mean, anv eus mare aloubadegoù meur ar Vretoned), neuze enezennad Roc'h-an-Nort, kantonioù Kamptosell ha Menez-Falc'hun, ha bro-Sklison diouzh ar c'hreisteiz, bet distaget e 1789, Palud Breizh gant Bae-Vreizh, Nermouster (Hez gozh), Yeu gant Porzh-Breton (Heuz kozh), anezho rannbarzhioù hag a voe e dalc'h ar Vretoned, d'an hevelep mare.

Da c'houde c'hoazh, hor boa taolet evezh ouzh meur a dra all: n'emañ ket Kerrien hepken keit-ha-keit diouzh Beg-ar-Razh ha diouzh Beg Lomaz Penn-ar-Bed, diouzh mammenn ar Ster Selun, diouzh Pont-Mean ha diouzh Kreisteiz Nermouster, hogen bez' emañ c'hoazh diouzh Enez-Eusa ha diouzh Kreisteiz Bro-Sklison; diouzh Enez-Sun ha diouzh Enez-Yeu, diouzh Ingrand, ha dreist-holl diouzh an holl greizennoù relijiel pouezusañ, e Breizh :

1* Diouzh eskoptioù Roazhon ha Sant-Maloù ha diouzh Abati kozh Redon hag hini Kemperle, e adti.

2* diouzh eskoptioù Kemper ha Leon ha diouzh Kumuniazh kozh Bangor, gouezelat he doare-liderezh, hag a badas betek 1006 (Stag war-eeun ouzh Roma e chomas Ar Gêrveur, betek 1662)

3* diouzh arc'heskopti Dol hag eskopti Landreger

4* diouzh eskopti an Naoned hag Abatioù meur ar Veilherae ha Landevenneg

5* diouzh eskopti Gwened ha Santez-Anna-Wened

6* diouzh eskopti Sant-Brieg hag Abati an Diskuizh-Mat.

*

Tu a vefe moarvat da gaout meur a geñveriadenn all. Lezel a reomp war gont tud all ar garg d'o c'hask hag ar blijadur d'o dizoleiñ. Trawalc'h hon eus merket da ziskouez pegen souezhus ez eo an holl fedoù-se o klotañ kenetrezo. Ma vefe bet ur wech, pe ziv, ne vefe ket peadra da vezañ estonet, hag e c'hellfed komz

(*) Sellout ouzh ar Gartenn e dibenn al levr.

eus taolioù-chañs. Hogen merzout kement all a gendegouezhioù o klotañ ervat an eil gant egile, eveshaat e kaj ar pavar a-hel douaroniel en hevelep lec'h, hag emañ al lec'h-se keit ha keit diouzh pennoù pellañ ar vro ha keit ha keit diouzh ar c'hreizennoù relijiel pouezusañ ha brudetañ, a ra d'an den soñjal n'eo ket en em gavet kement-se hep ur youl visterius. Marteze e vo tud dishual o spered, evit ober ur c'hruz d'o divskoaz, met eno ez eus ur gudenn ha na vo ket diskoulmet dre c'hoapaerezh ha diwar skañv. Ur gudenn a lavaromp, ur gudenn douaroniezh ha jedoniezh. Ne oa ket ar Werc'hez moarvat, hep gouzout pelec'h edo o tiskenn ar 15 a viz Eost 1652, pa rentas ar gomz d'ar vesaerez yaouank Janed Kourtel, hag a dra sur he deus diskoulmet brav-tre ar gudenn-se'vel da verkañ a venna-hi donet da vezañ Mestrez ha Rouanez Breizh, Breizh en he fezh. Ha n'eo ket hep esmae hor boa taolet pled ez eo dres 300 vloaz goude ar gweledigezhioù brudet, hor boa ni hon-unan dizoloet kement-se.

Sur-mat, n'eus ger ebet gant ar Vretoned da "genkizañ" evito o-unan Mamm an Aotroù Krist, e-giz ma o deus bet re all c'hoant da genkizañ Doue e-unan (Gott mit uns! O Lord our God, arise ! Scatter her enemies ! Dieu est-il Français ? Le Fille Aînée de l'Eglise, hag all..), hogen Kerrien, kreizenn douaroniel Vreizh, bet dibabet gant ar Werc'hez hec'h-unan, a zo evidomp an testeni hag ar merk anet eus he mennadoù e-keñver ar Vro bet gweladennet nebeut a-raok gant he Mamm Santez Anna (1625).

G. LATIMIER, aotreeg war al Lizheri, D.S.U.


Notennoù: Troet eo bet ar pennad a-us diwar ar galleg. Adaozet eo bet un tamm an dibenn anezhañ gant an troour. An anvioù-lec'hioù a Vreizh-Uhel hon eus brezhonekaet ivez, met re nebeut a zielloù a oa en hor c'herz evit ober labour skiantel-rik.

Kamptosell = Champtoceaux, Menez-Falc'hun = Montfaucon. Fraenez=La Fresnaye (SAV, Niv.29)
Ar stumm Pont-Mean hon eus miret, hervez skrid G.L.

Ar stumm Ingrand en defe ezhomm da vezañ burutellet. Ingrann pe Igrann a vefe koulz, pe well zoken. N'eo ket a-ratozh-kaer eo hon eus graet un anv keltiek-rik Belaer gant ar stumm galleg Bel-Air !

*

LEVR/DUEG VARR-HEOL : moulet e Presbital Bulien, Bro-Dreger.



1952

